

Al Liamm

NIVERENN

Gouhere - Eost 1963

99

DASTUMAD «SKOL»

RUMMAD KOZH - Niv. :	LUR
1 : Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre	3
2 : Kelennadur ar Frizeg (diviet)	
3 : Douaroniezh Vreizh gant A. Guilcher	3
4 : 300 Divinadell (diviet)	
5 : Rimadelloù hag unangomzoù	3
6 : Kudennoù ar Skolioù er Slesvig	3

RUMMAD NEVEZ - Niv. :	
1 : Skol Sant Erwan (diviet)	
2 : Nedeleg en Breizh (4 fezh-c'hoari gant Jarl Priel)	5
3 : Danevelloù diwar-benn ar Bleun-Brug ha Skol Sant Erwan (diviet)	
4 : Kontadennoù Kozh ha Nevez (ul levr klok da gelenn ar yezh er gêr hag er skol)	7
5 : Danevelloù a bep seurt	3
6 : Daou vloavezhiañ e Skol Sant Erwan	3
7/8 : Krennlavarioù dastumet ha renket gant F. Kervella	6
9 : Kanaouennoù Santel ha Komplidoù ar Sul gant M. G.	4
10 : Ar C'hembraeg hag ar Skol	5
11 : Face au problème de la Culture dans la Bretagne d'aujourd'hui	4
12 : Ar Brezhoneg er Skol	3
13/14 : AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU, levrenn gentañ, 166 pajenn ..	8
15 : Prizoniad ar C'hâokaz, gant Tolstoï	3
16 : Breizh hag ar Bed, pennañoù-kelaouenn gant H. Konan	4
17/18 : AL LENNEGEZH VREZHONEK, eil levrenn, 163 pajenn	8
19/20 : EVEZHIADENNOU WAR C'HERIADUR R. HEMON, gant F. Kervella, levrenn gentañ, 113 pajenn	8
(An eil levrenn a vo embannet e 1963)	

Abbé LE CALVEZ, Aumônier, Crec'h Avel LANNION
C. C. P. SKOL, Rennes 1911 06

**Ar bladenn hirbad : RIMADELLOU HA KANAOUENNOU
EVIT AR VUGALE**, 33 tro, 30 cm, 20 lur, gant ar mizoù-
kas hag an destenn skrivet.

Dastumad WANIG HA WENIG, dindan ur golo moulet :
1961 ha 1962 : 3 lur.

Niverennoù distag eus 1959 ha 1960 : 0,50 lur pep
skouerenn.


Koumanant-bloaz da Wanig ha Wenig, 6 niverenn : 3 lur.

C. C. P. WANIG HA WENIG, Rennes 1705 96

TAOLENN

Ar Stêr, gant Youenn Gwernig	244
Hent ar menez, gant Youenn Gwernig .	246
Harlu, gant Youenn Gwernig	247
Jiboesaourien, gant L. F. Bodkelen .	248
Diwar Omar C'hayyam, gant Roparz Hemon	249
Vasili, gant Jarl Priel	261
Skol-Louarn Veig Treben, gant Youenn Drezen	276
Istor ha Lec'hanvadurezh, gant T. Jeusset	283
Notennoù diwar Lennadurioù, gant Youenn Olier	290
Meven Mordiern gwelet, gant Skolidi SADED	294
Notennoù.	300

Pep gwir mizet strizh



FANCH ELIES
e miz Here 1958

Youenn GWERNIG

Az Stez

*Na fresk ha seder
hiboud ar stêr,
na tener he frond
ha glan pa gan evnig an nevez-hañv
e sioulder ar beure ;
en draonienn ar gwez
a walc'h o fennoù skuizh e yaouankiz an heol
hag ar saout er strouezh
war veg o c'herniel a hej latar o huñvre.*

*Na yen ha gwenn ha glan
anal ar stêr
pa gont-hi, o hiboudiñ, da c'heotenn ar ribl
he randonnennoù kuzh,
ha pa gan e glanded e ene
e-unan er beure
paotrig ar saout
o kas e loened d' ar stêr.*

*Na yen ha glas
dremm ar plac'h
e glaseded ar geot.
Kavet eo bet e don ar stêr
daoulagad digor frank
— divuhez —
paret war-du an oabl...
Na sioul ha yen
dremm ar plac'h,
an dour o tiverañ goustadik
diouzh dantelez he c'hoef pourled.*

*An evn a dav
ha pelloc'hik
o strinkañ dour, liesliv, e bannoù an heol
paotrig ar saout a gan
noazh e-kreiz ar stêr.
Warc'hoazh ivez
Warc'hoazh
an evn a gano c'hoazh
e sioulder ar beure.*

Youenn GWERNIG

Hent ar menez

*War an hent bras dindan an oabl
ret eo din mont,
— ha va-unan —*

*War an hent kriz ha noazh
ret eo din mont :
n'eus hent-se nemetañ war lein ar menez,
ha n'eus den ebet
ha n'eus loen ebet
— nag evn —
war hent ar menez ;
ha n'eus trouz ebet
na safar
na kri.*

*Mein gwenn-eskern an hent a verv
dindan heol ar bed,
heol madelezhus
heol dizamant
o parañ evit an holl :
ar re zu
ar re wenn
ar re velen
hervez ar rimadell,
ar re vrav
ar re santel
al lonkerien
an dud dieub
ar re wasked ;
Heol madelezhus o flourañ korf krignet ar c'hast
heol glan o tigeriñ malvennoù al lili
er beure,
n'eus nemedout, Heol doueel,
n'eus nemedout-te
ha me
war hent ar menez.*

An Uhelgoat, Eost 1961.

Youenn GWERNIG

Harlu

*Tud harluet, meuriadoù ha meuriadoù
a-hed hentoù ar bed
tud harluet strewet tro-war-dro
kaset davet ar broioù estren
evel chatal,
tud harluet o hadañ en un douar eneb
ar greun a gresko d'ober ur vleunienn hañval ouzh hini an
[estren,*

*DISPI hec'h ano
(met den ne ra 'van)
mizioù ha bloavezhioù tremenet
ouzhpen tregont
d'o heul ar pempvet deiz, lonket,
« Krevet eo an diouganer
Ha krevet mat, loñ la.
Krevet eo an diouganer
gant e sac'had ! »
Ret eo sentiñ da benn ar Stad
se 'zo ur roll hag ul lezenn
a-berzh Doue hervez ar veleien ;
tud, paourkaezhig, tud,
ha gouzout e rit-hu petra fell d'an Aotrou ?*

*Aide-toi et le ciel t'aidera
(sikour a reont anezho o unan, ar gisti)
Got mitt uns,
In God we trust,
ha ni ?*

*Denig, denig,
na leñv ket war eskern da bobl
strewet tro-war-dro d'ar bed :
sentet he deus d'he mestr ;
pobl kredus
pobl kreñv ha gwan war un dro
pobl harluet
er broioù estren
hag en he bro.*

L. F. BODKELEN

Jiboesaourien

*Tud yaouank,
Pa gano ar c'hilhog,
Pignit war lein ar runioù glas
Diouzh laezh ar beure splann evit gant jourdoul,
Pa deuio da wenn an dremmwelioù noz !*

*Ho kalvet em eus,
Mibien, va mibien,
Ha sed m'ho kwelan eus a-bell o tont
Jiboesaourien !
A ! D'an hemolc'h santel, diredit, m'ho kouvi :
Ho kwalc'h ho po ennon.
Ha gwelout a reot va dremm a sklerijenn,
Hag e tinaouin deoc'h gouloù flour ar mintin !*

*Mes tenn an hent a gas d'an neac'h,
Ha groñs goulenn ho kof :
Ha gwell eo bet ganeoc'h treiñ ouzh ar c'hoajoù pell
Pa gane ar c'hilhog,
Ha mont da redek hep selaou va mouezh
War-lerc'h un hoc'h-gouez !...*

DIWAR OMAR C'HAYYAM

gant

ROPARZ HEMON

Rubaiyat Omar C'hayyam a zo bet troet, a lavarer, en holl yezhoù ar bed. Se a vez buan lavaret. Ar Bibl e-unan ne oa bet troet nemet e 1125 a yezhoù er bloaz 1954. Pezh a zo gwir eo ez eus bet er c'hant vloaz diwezhañ un niver bras a droidigezhioù pe a droskrivadurioù diwar bedergwerzennadoù Omar, kalz anezho graet hervez troidigezh saoznek Edward Fitzgerald, ha nebeut diouzh ar skrid persek.

Penaos eo deuet ur barzh a veve e kêr Nichapour, e Korazan, en unnekvet kantved, da vezañ ken anvek a-daol-trumm ? An istor a zo bet kontet meur a wech. E 1859, ur barzh saoz, Edward Fitzgerald, nebeut brudet e-unan betek neuze, a savas ul levrig, ennañ troet e saozneg 75 eus ar pemp kant bennak a bedergwerzennadoù aozet pe lakaet war anv Omar C'hayyam. 250 a skouerennoù a voe moulet gant an embanner Bernard Quaritch. Ken nebeut a brenerien a voe kavet ma voe buan lakaet al levrig war stal ar c'hozh levrioù, da vezañ gwerzhet eizh gweneg. Un deiz, Rossetti, o furchal e ti Quaritch, a gouezhas e zaoulagad war an titl iskis : « The Rubaiyat of Omar Khayyam ». Lenn a reas. N'en devoe ket ezhomm lenn pell evit kompren e oa etre e zaouarn unan eus ar c'haerañ barzhonegoù biskoazh skrivet e saozneg.

Brud ar Rubaiyat a oa graet. Pemp embannadur a voe graet gant Fitzgerald. Ar pevare, an hini a advouler peurliesañ, deuet er-maez e 1879, a zo ennañ 101 a bedergwerzennadoù. Ar berzh a yeas war greskiñ betek bloavezhioù kentañ hor c'hantved. Diaes niveriñ an embannadurioù a bep seurt, a bep ment (unan n'en deus nemet 6 mm. hed ha 5 mm. led), a bep pouez (unan a bouez ouzhpenn 7 Kg.), skeudennaouet ha kinklet e pep doare (an hini a yeas d'ar goueled gant an « Titanic » e 1912 a gouste mil lur sterling). Hiziv c'hoazh,

ma kaver un tammig blaz ar c'hozh gant barzhoniezh Fitzgerald, e c'heller mont e n'eus forzh pe stal-levrioù e kement bro ma komzer saozneg enni da brenañ ur « Rubaiyat ».

Omar C'hayyam, da lavarout eo Omar an Telter (« Telter » e anv-pluenn, pe hervez lod, anv e dad), a oa jedoniour, steredoniour, ha prederour ha barzh war ar marc'had. Karget e voe gant ar Sultan Malikchah da adkempenn an deiziadur. Skrivañ a reas en arabeg ul levr lizherjedoniezh. Anavezet oa ivez en e vro evel aozer pedergerwerzennadoù, hervez giz ar perseg : ar gentañ, eil ha pedervet gwerzenn oc'h echuiñ gant un hevelep klotenn, an teirvet diglotenn peurliesañ. Ne veze ket, avat, renket e-touez brasañ barzhed ar vro.

Dleour eo da Fitzgerald eus e vrud dre ar bed-holl. Kened, re vilis a-wechoù, ar gwerzennoù saoznek he deus graet ar burzhud-se. Kenvroiz Omar a zo bet souezhet : perak dibab anezhañ, emezo, pa oa re all, — evel Roumi hag Hafiz, da skouer, — dreist dezhañ ?

Barzhed vrasañ Persia, siwazh dezho, n'o deus kavet nikun da dreiñ o gwerzennoù ken brav ha ma voe troet gwerzennoù Omar gant Fitzgerald. Un abeg all a zo : evit tañva o oberoù ervat, e ranker bezañ studiet istor, kredennoù ha sevenadur Persia, hag ouzhpenn poaniañ da gompren menozioù espar damzipleget e doareoù kevrinek ha soutil. Menozioù Omar C'hayyam a zo er c'hontrol menozioù sklaer peurvuiañ, a-wechoù boutin, a zo bet lavaret hag adlavaret e pep amzer hag e pep bro : n'eus netra padus war an douar, an dud a dremen evel ar bleuñv, kemeromp hor plijadur keit ha ma c'hellomp, hag all. Tud 'zo o deus soñjet e oa don e filozofiezh. E gwirionez, n'en deus filozofiezh ebet nemet un amgredoni, gwech renakus, gwech goapaus, gwech melkonius. Omar C'hayyam n'anavez mann eus speredelezh virvidik Roumi, a veve en trizekvet kantved, saver Urzh an Derviched-Tro :

*« Marc'heger an Neñv a dremen,
Hag ar boultrenn a sav er vann.
Ha bremañ ez eo tremenet,
Hogen ar boultrenn c'hoazh a van.*

*Sell-te start, rag-eeun, dirazout.
Ahont e welez ar boultrenn.
Na sell a-gleiz, na sell a-zehou.
E boultr eo roud an Didermen.*

.....

*Hennezh eo repoz va ene,
Hag en-dro da 'm c'halon e plezh,
En-dro da 'm c'halon wenvidik,
Un droellenn a levenez.*

*Ha me, eus va gwele-douar
A sav va fenn en ur c'hoarzhin,
'Vel ar wezenn, pa soub he zroad
E dour bev ar Stivell lirzhin. »*

Ha daoust da se, Omar C'hayyam an amgredour, a sav dichek e vouezh a-enep Allah, a zibab ar Gwin hag an Davarn da benharouezioù e vedarvesterezh, kenedel kentoc'h eget speredel, en deus lakaet milionoù a dud da dridal. Ne gav ket din ez eo fall reiñ e brezhoneg un heklev (n'eo ket un droidigezh), evel ma voe graet e kembraeg gant J. Morris Jones, eus barzh kozh Nichapour.



DIWAR OMAR C'HAYYAM

1

Sell er Reter ! Hemolc'her ar stered
A vann e las, hag un deiz c'hoazh a sked.
Pe hent, goude bale, deiz tremener,
Ez i gant Stêr an Amzer ?... N'ouzer ket.

Ne ouzer tamm. Er beure flamm, ha me
O vont er-maez, pounner pouez va reze,
Eme ur vouezh : « Pep buhez zo esgoar,
Latar, arvar, ha later adarre. »

2

« Dre 'r bed a-bezh e plezh an Nevez-Hañv
E garunenn. He frond en aezhenn skañv

A sav tener. Bez seder un herrad,
Pa ziwisk prad ha koad o dilhad-kañv. »

« Evned a gan, a richan dre an aer.
An heol lirzhin a skin er mintin sklaer.
Te, den, dilez en e wrez hag e sked,
Evit ur pred, ha morc'hed ha preder. »

3

Ne welor mui rozegi diniver
Liorzh Iram, ur bam en hec'h amzer.
Ur bod roz gouez, avat, a dres espar.
Gwiad e varr en dour war lez ar stêr.

N'eus palez mui na ti e Babilon.
Kirus vrudet zo pulluc'het e dron.
Met an adan a gan e garantez,
Atav ken fraezh e yezh, ha skiltr e son.

4

Bout divorc'hed ! Boked a vleunie dec'h,
A-benn arc'hoazh a vezo kras ha sec'h.
War an Douar, da Zorn digar ar Ret,
N'eus yaouankted na kened a ve trec'h.

Skeudenn an tour, en dour melezouret,
Pa skej ar vag ar gwag, a ya da get.
Staon all a droc'h, ha sùroc'h e vo c'hoazh,
Krec'h ha diaz, an tour bras difaset.

Sell ez askre : delienn goude delienn,
Lusk da vuhez a gouezh diouzh ar wezenn.
Pep tenn-alan a varv, a-boan ganet.
A bred da bred e red ar Blanedenn.

5

Impalaered, priñsed, sultaned vras
A sav, a gouezh. War o bez, palmez glas
A dreant sonn hinon an ec'honder,
Uhel en aer, seder, hep ober kaz.

Hag e oant fur, illur ! Gwent ha kurun,
Rust, a safar hag a groz war ar run.
Loened a c'hrak, hag a goag, hag a gri.
Ha biken mui o zourni n'o dihun.

6

Ha nag a re, a veze o tremen,
C'hoazh ergentaou, e-biou dimp, ken laouen,
Hag o deus graet er vered, dre redi,
Pri dindan bri, o zi da virviken !

En hon touez ez aent, mignonezed,
Mibin ha gren, ken mistr en o c'hened !
Yaouank e oant, drant en o c'harantez.
Teñzor o gwrez en traezh a zo trezet.

Pebezh barad ! tud hegarat ha dous,
Trumm o zeurel izel gant ar re lous !
Ar gwinizh glan stlapet war an andell,
Pe en avel, evel pell, evel plouz !

7

Skeudc'hoariva Allah ! An Oabl da framm,
Lunioù espar, chin ha lu, war ar skramm.
Pebezh c'hoari ! pebezh dudi ! ni holl
'Kreiz ar c'horoll. Da gantol an Heol flamm.

Meurvor Allah ! An donn, a vloaz da vloaz,
A sko er c'hro, a dro hag a sko c'hoazh,
Start, dizehan, hep ober van, ha ni
N'omp eviti mui 'get ar bili noazh.

8

Hastit, koskor ! E zor vras divorailh,
E talc'h Doue e Garavañserailh.
Paeañ ho skod a rankot : sed o tont
D'ober ho kont, en tu-hont, ur Spontailh.

'Vit ur mare, en e Ostaleri,
E ro Allah da galz bod ha c'hoari,
Enor, pompad, chervad, ebat ha trid.
Echu al lid, kuit an ostizidi !

Ha c'hwi, ken her ha dibreder er Sal
O deus kuitaet, mut, staenet hag aet dall,
Da vont er bez ivez a zilezo
Ar Sal d'ho tro, sko ho tal ouzh o zal.

9

Kalon ar gwaz, er c'hadoù bras lazhet,
E sae lintrus ar roz ruz zo kuzhet.

Roz gwenn a vir o c'halir koantiri
Ar plac'h, hag hi, yen er pri, dislivet.

War ar geot flour, te a vourr o c'hourvez,
Pa bouez pounner tommder an endervezh,
Koantenn. Diwall ! Un all zo he c'halon,
Diwadet, don el leton, mignonez !

Ha diwall, tra ma waskez ouzh da weuz
Al lilienn. He lifre gwenn en deus
Ur c'houn, aba voe ganet, a lavar
Marzhoù espar a c'hlaç'har hag a reuz.

Ur banne gwin a vez ganin strinket
'Kreiz ar boultrenn, a gredfen, 'vez fennet
En lfern yen, betek gen un Ene,
Hag hep morse reiñ distan d' e sec'hed.

Ez kambrig kloz, direpoz en noz du,
O treiñ, skuizhet, da spered tu pe du,
Klev o sevel a-bell an avel yud,
A gas an dud hag o brud da ludu.

10

Kelennadur ha stur gant ar furien
Am eus klasket, sunet meur a gredenn,
Da zastum mel ha kaout poell evelto.
Tra ne dalvo ! goullo va c'holoenn !

En o c'helenn, gwir hepken ur gentel :
Bleuñv ha bediz, holl ur c'hiz, a-izel,
Gwitibunan, a gresk dindan an Neñv,
Holl a zideñv hag a weñv, holl heñvel.

11

Er Vuhez all huñvreal ne c'hallan.
Touell ha tun ! Nikun, biskoazh unan,
Steuziet e Bro ar Skeud, n'eo distroet,
Nikun, nepred, dre'r bed hed ha ledan.

Gwa ha mil gwa an hini na laka
En uvelled e gaouded. Breur, eta,
Lavar e don da galon : « Ne don ket. »
Ne vi nepred nebeutoc'h 'get netra.

Ha koulskoude, ar re o deus gweet
Pallenn ar Spi, hag i oa faziet ?
Mojenn ha kan a van. An diouganer.
E veg a serr, hag a vreïn er vered.

12

Tra link ha moan, dispis, displann, anvet
 Doue, e Peul pe e Teul azeulet,
 Klasket e Loen pe e Maen da Eneb,
 Un hevelep gant nep rumm gwech ebet !

Emaout en Tan ? Nann. Emañ da annez
 En Dour, en Tir ? Tamm ne spir. Dreist diraez
 Emaout en Aer ? E prad sklaer ar Stered ?
 Ne ouzer ket. Ha bepred e redez.

Va bizied em enkted davedout
 A astennan. Pa dapan ac'hanout,
 'Vel arc'hant-bev a-strew, prim a-nevez
 E tilammez, haq e tec'hez ez roud.

13

Ne ouzon-me. Te a oar marteze,
 O vout ganet er Bed, petore dle
 Oa war va skoaz ? perak oas oc'h astenn
 Da zorn, goulenn gwir-antren an ene ?

An ene noazh, d' ar c'hentañ paz sklaset,
 War an treuzoù er gouloù badaouet,
 En estrenvan, paour, gwan ha distrantell,
 Paeañ an dell, hep diell siellet !

14

Te, dre da c'hras hor furmas, ni az ped,
 Krouer hor rec'h, distaol bec'h hor pec'hed,
 Gwir atizer an Naer-hont a werso !
 Ha te da 'z tro a vezo pardonet.

Pe daoust ha te, Doue, 'vije kouezhet,
 Evit da boell, en touell antellet
 Gant an Arc'hdroug ? War da choug e tougez
 Neuze ar vezh. Bez-te digarezet !

15

Gant ar vouilhenn a reas an den kentañ,
 Asur, edo ar C'hrouer o klozañ
 E labour meur. Skleur e gentañ beure
 A ziougane skeud e noz diwezhañ.

Ar volenn-se, troet war he genou,
 A-us d' hor penn, a venn hor pedennoù,

Noz-deiz gervel, ouzhimp n' hell teurel pled :
Tra vak, paket e red ar c'hantvedoù.

Paouez neuze ! Te 'oar ne ve nepred,
Evit preder nag esper diverket
(Gwell ober goap, va mab !) a-us da benn,
Da Blanedenn gant reolenn linennet.

16

« Men, va Ene, » am eus-me goulennet,
« 'Mañ ar Bed-hont ? » Pront en deus respontet :
« Me 'wel, den kaezh, ez kig hag ez eskern,
A droad da gern, Neñv hag Ifern sternet. »

17

Selaou, profed, ha taol pled ! Ez kredenn,
Da gemmañ ster, ur ger, ul lizherenn
A zo a-walc'h, hag a zalc'h an alc'houez
D' ar 'Wirionez a-bezh ha d' al Lezenn.

Lez da rambre ! Te 'venn faoutañ blevenn !
Follezh ha lorc'h ! Klask diforc'h zo sorc'henn
Ha ne deo fent ? 'Vel kerent en hentoù,
Ar Gwir, ar Gaou a gerzh o-daou laouen.

Rebec'h a rez dibaouez, hep espern,
An neb na da war da lerc'h. Petra 'vern ?
Pa vi emberr, mar sklaer 've da spered,
En deñvalded, mouget-mik da letern !

18

Mestr an Davarn, da zarn, e skouarn lent,
Ne ro digor, hag an nor pa dorrfeñt,
En o gwerenn takenn ne ziskenno.
Koulz 've dezho mont afo en o hent.

Ar furien-se, a zeske d' ar re all
Lakaat o spi er studi, ha diwall
Diouzh mezventi, e soursi diziwezh,
Int eo a lez er-maez en nozvezh dall.

Padal, souden, lous e benn, un den kaezh,
Ur paour laouek ha truilhek a zegouezh.
Da zegemer ar c'hasker, hep termal,
Ar Mestr raktal e Sal a zialc'houez.

Ha sed ar marzh ! Deut e-barzh, 'n ur c'hoarzhin,
 Ar Mestr neuze d' ar c'horker e Gevrin
 A ziskuilh flamm : Euzh, Estlamm, Droug ha Mad,
 Gaou, Gwir, Tonkad... e strad ur gihad win !

Gwin eus an Neñv, ruz, kreñv. An Ael Teñval,
 Dre al latar, d' an Douar gwezharall,
 Kannad Doue, hen douge war e skoaz,
 Louzoù d' ar c'hloaz, hag ankouazh hep astal.

19

Gwerzher ar Gwin, pa 'z paein, ne rin klemm.
 Dezhañ n' eus par, me 'oar, aour nag arem.
 Bravigoù kaer ? diamant sklaer ? perlez ?
 Pe vadoù rouez a brenez en eskemm ?

Eñ eo Mahmoud, 'vel ur froud o voudal,
 Trellus e sked, gant luc'hed war e dal,
 Reklom, korc'hwezh, a faezh gant e Gleze
 En hon ene arme du an trechal.

Kinnig a ra Allah e Baradoz
 (Da virviken war e benn mil bennozh !)
 D' e garidi n' ouzomp-ni pe likor.
 — Chom e sec'hor seurt teñzor da c'hortoz ?

20

Nag a dabut etre tud a studi !
 Nag a vabouz hag a drouz, fri-ouzh-fri !
 Da seurt kleñved-spered ez erbedin
 Ul louzoù fin, brintin : chug ar gwini !

Pa glask hudour treiñ plom paour en aour fin,
 Loavañ d' e c'hoant plac'h koant gant c'hwistantin,
 Labour ha poan a foran en aner.
 E berr amzer e kaver gwell er Gwin !

21

Un evn yaouank a sklank dre ar brankoù :
 « Gwin, gwin ha gwin ! » Ne vern din kevrinoù,
 Hud na salmoù, digoroù na fougé.
 David Roue zo serr e vuzelloù.

Ur fri-mic'hi a c'hoari bili-bann.
 Hag un doktor a zigor ar C'horan.
 Te, lak e plac'h pe wrac'h da albac'henn.
 Gwin em gwerenn hepken a c'houlennan.

Dre brederi, studi na pinijenn,
 Morse distan ne gavan da 'm anken.
 Padal, a-boan ma krogan en hanaf,
 Diskoulm pep kraf a sav spis dre va fenn.

22

Da Ramadan, va-unan, kent an noz,
 Dre gêr ez aen. Trumm, en ur foukenn gozh,
 Ur bobl iskis a welis a listri,
 Stummet gant pri, hag i poazh pe ziaoz.

N'oa gour er gêr, ar Poder aet er-maez.
 Hogen er stal deñval, a draoñ da laez,
 Dre-holl e oa breutadeg ha safar,
 Fistilh espar e peoc'h don ar pardaez.

Ur jarl nodet, distagellet e deod,
 A brezege, a wic'he : « Mod pe vod,
 E feiz, m'hen tou, an derou, ne ouzer
 Hag hen kaver er Poder pe er Pod. »

Ur vuredig vlizik, he beg figus :
 « Me, » emezi, « zo gant pri prizius
 Stummet jentil, gant revil ha mil bre.
 Va distruj-me ! Se a ve sebezus ! »

Ur pod truek, tagosek, en e gorn :
 « N'hon ket dispar ! Deut on gwar eus ar forn.
 Graet on a-dreuz, disneuz, hag em eus mezh.
 C'hwi 'wel : Hennezh ivez a gren e Zorn ! »

'Kreiz an tabut, chomet mut, ur skudell
 A droc'has krenn : « Babouzerien, menel
 Atav diqas, didregas, dichastre,
 Hep soñjal re, dra 'm le, ha ne ve gwell ? »

Hag ur bodez : « Pezh follezh souezhus !
 Ober kof moan, se a gavan mantrus !
 Evidon-me 'vo difoutre bepred,
 Ya gant boued ha died karget-druez ! »

23

D'an idoloù enorioù 'm eus douget,
 Fals doueed gant gred darempredet,
 Hag eus ar sent graet fent. An disentez :
 Me 'm eus kalz mezh ha karez gounezet.

Ha me soñjal : « Den dall, brav 've bale,
Pa zeuy an eur, Allah Veur p'en deurfe,
A-hed e bont, da vont, dre e vontez,
En e balez gant Aelez... marteze. »

O tilezel pratell ha tinell flour,
E wiskis-me lifre ar penedour.
An hañv en deus va c'heuz, siwazh, teuzet,
Ha va morc'hed paket en e roued aour.

24

Dre ar vein sec'h, 'kreiz ar gouelec'h ec'hon,
Geot a ziwane, ha man, 'tal an andon.
Perak nepred ne ve kresket eta
Ken dister dra e gouelec'h va c'halon ?

Gwel ez kichen ar Rozenn, tremeniad,
Hag a zispak dirak da zaoulagad
He c'hened fresk ha bresk, hag e teski
Bout evelti difrom, hag hi dibad.

25

Da vil kudenn, oa tenn, digomprenus,
Dre hent soutil e kavis mil diluz.
« Er Bed ganet, dre ar Bed e redan :
Da ven ez an ? » — Sed unan a van kuzh.

Un Nor a zo : nep tro n' he digorimp.
Ivez ur Ouel : he sevel ne c'hellimp.
ME, TE, lavar ha safar ur mare !
Ha ME na TE morse mui ne glevimp.

26

Ma vefe tu, Ael du, Ael didruez,
A zezrevell diell an Denelezh
E Levr ar Ret, da vrouilhed rasket-krenn,
Gant da bluenn e skrivfen falsentez.

Na c'hwek e ve, va huñvre, diregiñ
Hor bed dister, hag a-herr e derriñ.
Hag en eston hor c'halon, mont hon-daou,
Gant e dammoù, bedoù all da grouiñ !

Dre an aer sioul ha boull, un daboulin
A ruilh a-bell dreist dremmwel ar selin.
Ar Bed a souz, hag e drouz e douster
A veuz, tener, er C'hafun anterin.

Bezioù, war varr an douar, rez-ha-rez,
En noz, a van mudet dindan an drez.
Kig ha spered, mouget er vered yen :
Hiviziken, anken na levenez.

Du-hont, al loar a bar e lein ar gwez.
Nè vo dale, e klod ul loar nevez,
He bannoù sklas, er geot glas o taskren,
Az klasko, den... en dachenn digenvez.

Klevit avat ! Sed er c'hoad an adan !
Sklaer ha dichek ha c'hwek e sav e gan.
Breudeur, bevit, evit ha bezit taer,
Pa 'z eus amzer, e splannder ar stergann.

Dalc'hmat, hep rat eus ho tonkad, a-dreuz
Ur Bed a vag dic'hoanag, spont hag euzh,
Kerzherien faezh, en diwezh, ra vezo
Ur Gib c'houllo a gouezho diouzh ho kweuz.

VASILI

— Dont a ri, Koncha, dont a ri, neketa ?

Matezh an ostaleri a zegasas d'ar plac'h yaouank meur a gelaouenn nevez voulet. E-keit ma lenne Koncha ar c'heleier, e kendalc'he Vasili d'erbediñ ar goantenn a zouge eveltañ, stag ouzh he c'horfenn, arouez alaouret ar Skol-Veur.

— Ar sulvezh-mañ, Koncha, kasomp en arbouellerezh politikel da droadañ. Merennañ a raimp er c'hoadoù ha goude e klaskimp tapout balafennoù a vent gant palv va dorn, plezhañ a rin evidout ur gurunenn orc'hid, hon anv a chomo engravet e pluskenn ur pikol gwezenn : en ur ger, hirie e raimp hon daou skolid al louarn. Ha d'an diwezh e lennin dit darn eus va faour kaezh gwerzennoù hag a seblant dalc'hmat, hervezout, bezañ troet a-ziwar ur yezh all bennak.

— A betra ez eus kael ganit, Vasili ?

Dre blediñ gant ar c'helaouennoù ma klaske warno moarvat patrom ur sae nevez pe chomlec'h gwellañ kampenner-blev ar gêrbenn, n'he devoa Koncha intentet ger ebet. Kloc'h bras an iliz-veur a dintas dek eur. Jogañ a reas ar veleganez ur gazetenn a ziskoueze war holl ledander ar bajenn gentañ luc'hskeudenn ar gwerinelour holl-vrudet, ar Prezidant Kristobal Hernandez, Tad ar Vro hag ar Bobl.

— Vasili, emezi, poent eo din skarañ kuit.

— Ha da belec'h 'ta ?

— Tav ! gout ouzout a-walc'h, evel holl izili hor c'helc'h, eo arabat dimp goulennata. Va seizh gwellañ a rin eveljust evit erruout e koulz hag en amzer er porzh kent na zidouaro al lestrig. Met bremañ am eus un tamm labour da blediñ gantañ.

— Abaoe pegoulz e labourez ar sul ?

— Evit an neb a zo troet da gerzhout a wir galon war du ar pal, n'eus ken, Vasili, na sul, nag ehan-labour. Ken emberr, kaezhig !

Paeañ a reas ar paotr yaouank e skodenn hag hini Koncha heg eñ er-maez en ur zougen dindan e gazel « *Diarbennadurioù* », ul levrig moan-moan, diwezhañ penn-oberenn Tad ar

Vro hag ar Bobl, rak ur wech an amzer e teurveze Don Kristobal embann un dastummadenn prederiadennoù diaes a-walc'h da intent, met n'eus forzh, gwech ebet ne chome e labour da loediñ er stalioù rak prenet e veze hep dale gant pep brogarour, ha zoken ar re na ouient na lenn na skrivañ.



E rakkambr ar palez divent e oa holl ganfarded laz-seniñ ar Gward o selaou gant ar brasañ striv e-keit ma taouplege o rener gant doujañs dirak ar c'horonal Perez, an ofiser tostañ da galon ar Prezidant. Damc'hlas en amheol, e seblante ivez an delwennoù marmor gwenn gwintet war bikoloù sichennoù stouiñ penn evit intent pep ger harzhet gant ar c'horonal.

— ...da zek eur hanter, emezañ, e tle hor rener holl-garet, tad ar Vro hag ar Bobl, digeriñ ar palez-mañ, nevez grouet gantañ ha kinniget d'ar rummadoù tud da zont. Pa vo an ambrougadeg war dostaat, e kavin tu da ziredek an a-raok. Kerkent ha ma krogo Don Kristobal da bignal gant an diri dirak an nor-dal e stagin da zic'hwezañ va zal e-giz-mañ...

Ha gallout a raje ober kement-se gant gwir abeg rak devañ o zreid a rae ar c'houlmed kerkent ha ma felle dezho diskenn ur pennadig war al leur dirak ar palez, hag aner e veze d'an douraerien loeniñ evit stourm ouzh ar fornigell ifern-se ; a-vec'h e flistre diouzh o c'horzennoù, e tarnije raktal an dour e giz ur bouldrennig liesliv.

— ...pa savin va dorn dehou a-us d'am zal, Aotrou rener al laz-seniñ, e reot d'ho tud kregiñ gant hor c'han broadel...



E-keit-se edo Vasili o tiskenn en ur c'hwitellat war-du ar porzh-mor. Morennet war doull dor o stal e-mesk o fakadennoù e tiroc'he pe e varailhe ar varc'hadourien war an oad, hep ober van ouzh ar bern kelien o fraoñval en-dro d'o barv gwenn. Beleien o zog blevek hag o mantell hir-hir a-dreuz skoaz, hemañ lartoc'h eget ur vlonegenn, hennezh all ken treut hag ur vazh-yod, a rode sonn ha c'hwezhet gant al lorc'h hep teurel ur sell hepken war ar gwragez a zaouline dirazo da bokat d'o soutanenn gailharet. Amañ hag ahont e piltrote leanezed didrouz, herr warno, hag a steuze a-greiz-holl, lonket evel logod tapet er stign, gant dor dic'hras ur gouent bennak. E porzhioù klozet gant mogerioù ruz-tan,

melen-aour, glas-gwer pe wenn-raz, uheloc'h ha tevoc'h an eil eget eben, e weled itronezed o vransellat en disheol war o gwele-skourr, hep teurel pled ouzh ar werin o tifreñañ er straedoù hag a denne da beorien en desped d' o dilhad d' ar sul. Guped o gouzoug diblu, karget da lemel a-ziwar ar pavez al lastez taolet warnañ da vreinañ, en em ganne en ur c'han-dour en-dro d' ul loustoni bennak ha lonket ganto o freiz a groge da nijal, pounner ha dizampart, hep ober an disterañ trouz gant o diveskel ramzel.

Ganet er vro-mañ, e krede a-wechoù da Vasili ne oa e-touez e genvroidi nemet ur gwaz direnket hag un estren-rik.



Daoust ha ma troe gant herr ar gwenterezed, e krede d' ar gouvidi a uhel renk chouket e rakkambr ar palez nevez ne oant nemet paour kaezh merzherien, a-drugarez d' ar c'hwezhen o tiverañ a-hed o mell-kein hag o taskrognat dibaouez o holl izili.

E-maez, e klemme ar bobl, paotred ha merc'hed, suilhet gant an heol didruez ha gronnet hep gallout ober an disterañ fiñv a-dreñv div regennad soudarded war var da semplañ dindan bouez o zokarnoù, o fuzuilhoù hag o leraj gwennkann. Div pe deir gwech e kredas d' an dud o c'hortoz e oa war wel karr-dre-dan ar Prezidant, rak evel un eon bountet tamm-ha-tamm war-raok gant ar gwagennoù e kreske e penn ar vali ur safar diheson ha kerkent e soñje pep hini e save ar youc'hadennoù hag ar stlakadeg daouarn dirak Tad ar Vro hag ar Bobl.

Ken alies gwech en devoa rener al laz-seniñ troet a-grenn war du e ganfarded, ha savet gantañ d' an nec'h e grabanoù o manegoù gwenn e veze bep taol war var da leuskel ar sonerien da blediñ gant o binvioù pep hini evel ma ouie.

A-daol-trumm e tiredas, berr warnañ, ar c'horonal Perez hag eñ o vlejal a-nerzh e benn ur c'helou ne voe intentet gant kristen ebet, rak kerkent all o devoa staget sonerien ar Gward gant ar c'han broadel. Neuze e veogas ar c'horonal un toullad gerioù e pleg skouarn ar rener ha gant mil boan e teuas hemañ a-benn d' ober d' e dud paouez gant o zourni, met paotr an daboulin vras a gendalc'has ur pennadig d' ober diouzh e garg.



Edo un toullad micherourien kluchet e frekster ur c'hav o paouez lonkañ ur bezel avaloù-pebr, tomatez ha kignen ; an hini koshañ a waske goustadig war lerenn ur sac'h gwin, ha takennoù eus an evaj-se, o flistrañ a-stroñs, a luc'he evel ur c'hlizenn e barv ar c'hozhiad.

Gant avi e sellas Vasili ouzh ar gwazed-se ha fellout a reas dezhañ mont en tu all d'ar straed da derriñ e sec'hed en un davarnig, met a-grenn e chomas a-sav.

Er pellder e kleve blejadennoù iskis, evel pa vije bet ur bagad chas o harzhal war-lerc'h ur c'had. A bep eil tu d'ar straed e tigore ar prenestroù, ha gwragez, bugaligoù, ha paotred war an oad, gant aon rak tremen hep gwelout un arvest eus an dibab, a stoue o c'horf holl a-gevret, war var da zifaragouellañ d'an traoñ.

A-benn ar fin en em ziskouezas an den argaset gant un tolpad diniver : ur c'hanfardig treut-ki, e korf e roched hag eñ gleb dour-teil gant ar c'hwezenn, ul lampon bennak tapet moarvat p'edo o skrapañ ur bechad kig-sall, pe ur votoù-ler. En e zorn dehou e heje ur pezh pikol pistolenn ha redek a rae evel pa vije bet diwanet divaskel ouzh seulioù e spadrilhennoù. War e lerc'h e pevarlamme Aotronez kofek gant levitennoù mezher du en-dro dezho hag un tog foñs hir war o c'hokenn, ha ganto o zeod e-maez o lapenn e-giz chas-red o c'hwesa dija gwad' ar jiboez war-nes bezañ taget. Loudourennoù a droñse hep mezho o sae war o c'hof-kar distumet gant gwaziet koeñvet ha seul ma taoulamment, e winke o bronnoù en o justin evel daou gonifl kraouiet en ur sac'h. O skarañ ivez ar primañ m'hellent, met nec'het bras gant o heuzoù hag o c'hentroù divent e seblante ur strollad archerien pilpasañ hep mont ur gammed war-raok evel marc'h-eferien kouezhet a-ziwar o jav, ha kement e tifretent gant o sabrennoù ma veze darbet dezho da bep mare borniañ ur c'heneil bennak pe grennañ e fri dezhañ.

O vezañ ma vane Vasili souezhet krenn ha difiñv e-kreizig ar straed e kredas d'an tec'her e oa ar gwaz-se en sell da sparlañ dezhañ e hent.

— Tec'h alese, emezañ, penn bastard a zo ac'hanout ; anez-se e tennin warnout.

Feuket gant an dismegañs-se, ne chomas ket Vasili gwall bell da soñjal, ha daoust ha ma voe kerse gantañ raktal, ec'h astennas e c'har dirak paotr e bistolenn he setu hemañ ledet a-hed e gorf e poultrenn ar straed. Kerkent all e stagas d'ober e stal dezhañ ar bagad loened gouez a oa abaoe ken pell

amzer o redek war e lerc'h. Mont a raent gantañ a-daolioù treid hag a-daolioù dorn ; kouezhañ a rae warnañ bizhier ha disheolierien ken buan ha ken stank ha freilhoù war ul leurdornañ. Darn, dilerc'hiet un nebeudig met c'hoant bras ivez dezho da gemer o zamm perzh el lazhadeg, a glemme a-heligentañ o vezañ ne oant ket evit tostaat d'ar paour kaezh boureviet e-giz-se, hag emichañs e krede dezho e oa graet ur gaou bras outo. Itronezed o vont d'ar gêr goude an ofis a skoe gant o levr oferenn war gein kement fallakr a strive da virout outo da gemer o lod eus ul labour ken plijus.

Ur bagad kelaouennerien, difloupet den ne ouie eus pelec'h, o devoa yennet ouzh moger ur stal Vasili, gant nebeut a lorc'h ennañ goude e daol-kaer. E anv tiegezh, e anv badez, e vicher, petra 'oa en sell d' ober echu gantañ e studi, an holl draoù-se a oa goulennet digantañ hag ur bern all ouzhpenn, ha merket e voe en devoa prenet « *Diarbennadurioù* » levrig ar Prezidant Kristobal Hernandez, ar pezh a ziskoueze d'an holl e oa er paotr yaouank-mañ ur brogarour feal hag ur gwaz troet war-du al lennegezh uhel.

Bourc'hizien war an oad ha warno an neuz tud pinvidik meurbet a waske war e zorn ken ma krede dezhañ e vije a-benn ar fin friket e vizied. Darn en em zibabe da vountañ arc'hant en e c'hodelloù hag unan zoken e oa darbet dezhañ mougañ ar paour kaezh en ur sankañ en e c'henou ur segalenn ken tev hag un troad skubellenn. Darn all 'vat, erruet re ziwezhat, a c'houlenne, droug bras enno, o vezañ ma kave dezho ne oa Vasili nemet ur c'henwalleur d'egile, bete pegoulz e vije gortozet kent stagañ da blediñ evel ma 'z oa dleet gant an amprevan-se.

Deut e oa an archerien a-benn da ziframmañ an tec'her diouzh krabanou e vourevien ha gallet e voe neuze sellout outañ, met e pebezh stad truezus en em gave bremañ !... Pilhennoù e roched ne guzhe nag e gein nag e vruchet bloñset ha krafignet, libistred holl gant gwad ha skop. E benn hag a denne d'ur voull livet gant koar ruz a vralle etre divrec'h daou archer o redek, fae bras ganto dre vezañ sammet gant ur prizoniad ken lous, hag en ur vallozhiñ en em strinkas war-lerc'h kement hini en em gave touellet abalamour ma virent outañ kas da benn ul labour boulc'het gant kement a verv.

Manet en e-unan er straed, e kenderc'has Vasili gant e hent war-du ar porzh-mor.

Kerkent hag erru war ar c'hae, e c'houvezas eus a-bell pelec'h 'oa eoriet ar « *Preizer* », a-drugarez d' e siminal gwenn kelc'hiet gant kouevr melen. Daoust d' e anv lorc'hus ne oa ar « *Preizer* » nemet un tamm lestrig gant ur pikol rod brenn a bep tu dezhañ hag a gase bep sul ha bep gouel-berz un nebeut tud lezirek na gave netra welloc'h da ziduiñ o amzer eget ur valeadenn en don ar c'hoadoù bras, pell a-walc'h diouzh ar gêrbenn. Adal ma pignas war vourzh, e furchas Vasili e pep lec'h, dindan an tinelloù war benn a-raok ha war benn a-dreñv al lestr, a-hed an daou bont, ar sal-debriñ, an davarnig ha zoken pep kambrig, met aner e voe dezhañ redek ha diredek, ne oa ket bet Koncha den d' he ger, na roud na trez diouti ne gavas war ar « *Preizer* ».

E-keit ma lovee al lestr en ul leuskel war e lerc'h div roudenn arc'hant en dour pounner ha fankek ar stêr, e pare ar studier e selloù war ar ribloù e-lec'h ma wele o ruzañ war o flaen glazarded meur heñvel ouzh treustoù lardet gant pri. Marmouzed a bep ment a skrije en ur grapal war lein ar gwez, oueskoc'h eget an ampartañ martolod o pignal war veg ur wern. Amañ hag ahont e vranskelle goustadig naered veur gweet en-dro da droell-blantennoù hag o skant du a lugerne e giz braouigoù a-youl an heol hag an aezenn. « Pa soñjan, eme Vasili outañ e-unan, e vev er c'hoadoù-mañ tud hanter-c'houez o paouranteiñ gant an naon hag ar riv dindan baour gaezh logelloù plouz, korz ha fank, petra bennak ma 'z eus nepell diouto ur gêrbenn vrudet gant klañvdioù, ostalerioù bras, daou pe dri c'hoariva ha zoken ur c'hoarigan hag a vez leun kouch bemnoz !... »



Da serr-noz e tostaas ar « *Preizer* » d' ar porzh : harpet ouzh spled ar pont uhelañ, e laoske Vasili e selloù da barañ war al latar damruz en em lede a-us d' ar gêrbenn. E verenn en devoa debret dindan dinell un davarnig bortugalat hag e tanvvaas enni un heureuchin-daredek poazhet gant huegan-spagn ha laezh trenk. Gourvezet a-hed e gorf e-skeud radenn divent ar vro, o teuas dezhañ c'hoant lenn penn-oberenn Tad ar Vro hag ar Bobl, gant ur raklavar sinet gant Don Alonzo Mendoza, Ministr an Deskadurezh, en e yaouankiz mesaer ha spazher kezeg e pradeier divuzul ar c'hornog : setu aze e holl studi. Met m'en em gave nec'het pa ranke lenn pe skrivañ, en tailh e veze, hep koll amzer da gouchañ, d' ober

gant pep tenn pistolenn un toull e kreizig-kreiz ar bihanañ pezh moneiz. Kit 'ta da glask e-touez disketañ kelennerien ar Skol-Veur ur gwaz akwitoc'h evit eveshaat noz ha deiz ouzh buhez ur Prezidant Hollgaret !

An neb en deus, eme Don Kristobal, ur youl kreñvoc'h eget an dir ha kalon a-walc'h d' he lakaat da dalvezout evel m' eo dleet a zo barrek da drec'hiñ war n' eus forzh piv ha n' eus forzh petra, ha zoken war an amzer koulz an hañv hag ar goañv.

Pa soñjer ervat, e skrive ivez Don Kristobal, n' eus krouadur ebet ken kasaus hag ur bourev na oar ket penn-da-benn e vicher. Adal ma'z eus meneg eus kastizañ eo ret kaout tud diouzh-se, kanfarded barrek-tre ha n' eo ket pismigerien. D' am meno ar feroni gaset da benn a zo unan eus gwellañ stummoù an druez.

Neuze en devoa Vasili klozet e zaoulagad da brederiañ dihet kaer war reolennoù ken dic'hortoz ha menel a reas kousket kent na stagas ar « *Preizer* » da c'hwitellat, ha gwech ebet ziwezhañ ne teuas e vuiañ karet Koncha da drubuilhañ e huñvreoù.

Sklaerder al loar a hade daskleurioù aour war an dour o vourbouilhat dibaouez ouzh mein-benerezh ar c'hae. Edo un drompilh o seniñ war vourzh ul lestr-brezel kluchet el lennvor. Ar c'hreñvlec'h diavaez a zigore war du ar gêrbenn e regadennoù lomberioù-kav : « Daoust ha pegement a dud, a soñjas Vasili, a zo toullbac'het aze da vlasaat « *gwellañ stumm an druez* » goude bezañ bet boureviet « *gant tud a vicher ha n' eo ket gant pismigerien !* » E-keit m' edo al lestr o touariñ, en em strinkas un tren noz e-maez an ti hent-houarn hag e tec'has a-dizh a-hed an draezhenn gromm, ken drant hag ur c'hrennard diflipet diouzh ar skol.

Sklerijennet evel ar Werc'hez Mamm Doue gant aezenn arc'hant bev ur gleuzeur a bevar skourr, e oa bremañ Koncha ouzh e c'hortoz ha d' an daoulamm e redas Vasili daveti.



Izili kuzul meur kostezenn an Dispac'herien a oa bodet en un tiig dister e straed ar Mabig Jezuz. O rener, El Lobo « *ar Bleiz* » hervez ma veze graet dioutañ, ne oa nemet un tagos klañvidik, dalc'het gant ur paz diroll. Ne vane war e gokenn nemet un nebeut toupennoù blev louet ; ken berrwel hag ur

goz ne baoueze ket, diwar skouer al loen-se, da doullañ dindan douar trepasoù ha kevioù gwidreüs meurbet. A-wechoù e kroge ennañ reuziadoù feroni ken diskiant ma sponte e genwalleurien war-nes krediñ ne oa kalon ebet e kreiz ar seurt urupailh, netra nemet un tammig maen-tan. Ha koul-skoude ne oa hemañ nemet un oan e-keñver e vamm, Dona Kristina, ur wrac'hig vunut ha sioul, na oa ket evit gouzañv er bed-mañ tanfoeltr galloud ebet, na zoken hini he mab. A-walc'h e oa parañ ur sell hepken war he c'hroc'hen melen a liv gant ar c'hoar troet evit gouzout e rede en he gwazied muioc'h a vestl eget a wad.

Edo bremañ ar vaouez-se o tiskenn *mate*, evaj ar vro e bolennoù he c'houvidi. Met ar jeneral Miguel Arequipa a rae fae war ar *mate* hag an holl dourioù-louzoù ; gwelloc'h e veze gantañ glebiañ e vourennoù brabañser gant rom gwenn. Tapet gant e zorn er sac'h, e oa bet Arequipa gaezh tanfoeltret e-maez an arme dre ma laere re zivergont arc'hant ar gouarnamant ; daoust da se e oa deut a-benn d' ober d' e genseurted krediñ e oa bet kastizet abalamour d' e venozioù politikel. Ne veze ket pell o vont en gouez adal ma veze tomm dezhañ, hag an neb a felle dezhañ e gaout diwar yun e ranke sevel beuremat.

Ne wele en-dro dezhañ nemet trubarded rak gout'ouie fraez-mat e oa prest da werzhañ n' eus forzh petra da n' eus forzh piv, n' eus forzh pelec'h ha n' eus forzh pegoulz gant ma vije brokus a-walc'h e c'hopr ha gant ma tremenje hep bezañ yennet ur wech ouzhpenn.

— Ha petra soñj Tad ar Vro hag ar Bobl diwar-benn an darvoud-mañ ? a c'houlennas El Lobo goude ma oa torret dezhañ un nebeudig gant paz.

— Da gentañ holl, eme Don Esteban Garcia, ne reas nemet fougeal, peogwir e krede ne oa ar gwall-daol nemet un drobleg ijinat ha reizhet gant pennoù bras ar poliñ, met kerkent ha ma teuas da intent e oa bet tennet warnañ da vat ha kaer setu ma krogas ennañ ur barrad kounnar ken diboeñ ma krene an holl en-dro dezhañ gant aon rak gwelout o Frezidant doujet o koll war an taol e dammig spered.

Ar banker Garcia a dremene evit bezañ mignon tost d' ar Prezidant. Pinvidikañ fallakr ar vro, en devoa en e gerz daou pe dri di-bank, meur a labouradeg, mengleuzioù kouevr, tiez-kenwerzh, ostalerioù brudet, hentoù-houarn, kevredadoù-kreataat hag all, hag eus pep korn e rastelle arc'hant a-grabanadoù. Met daoust da se e skoazelle eus e wellañ El

Lobo hag e genseurted rak an neb a zo fur hag evezhiak a rank klask en koulz hag en amzer an tu d'en em ziwall diouzh an Dispac'h.

— Añer eo dimp gortoz an Iskariotez-se, e vlejas ar jeneral Arequpa ; ne zeuyo ket d'hon bete.

— Marteze a-walc'h, héhéhéhé ! eme Fray Vincente, pempvet ezel ar c'huzul-meur.

Fray Vincente a oa heñvel mik ouzh unan eus an dud-vouc'h a rede gwechall gozh er c'hoadoù, hervez ma krede da Baganiz, hag en tu-hont da se e oa peget ouzh e c'hroñj un tamm bouchig barv hag e vouezh a zaskrene evel hini ur c'havrig. Ar manac'h diveleget-se a oa bet kaset kuit eus e gouent abalamour ne veze troet e spered nemet war du ar vuhez diroll hag ar gisti. Abaoe-se en devoa kas ouzh ar bed a-bezh evit ar seurt dismegañs.

— Daoust ha pelec'h int manet ? e hirvoudus Dona Kristina. Ne oa ket peurechu he c'homz pa stirlinkas ur c'hloc'hig war ar pondalez hag ar wrac'hig a biltrotas da zegemer an dilerc'hidi.

— Deut out d'an diwezh, Koncha ?... Nann, nann, kaezhig, chom amañ da ziskuizhañ ur pennadig...

Vasili a vanas souezhet krenn ha digor gantañ e c'henou war dreuzoù ar sal.

— Deus e-barzh, mabig, daoust hag aon az pefe ? eme Dona Kristina en ur vountañ warnañ, ha goude e serras an nor hag e harpas he c'hein outi, gant he divrec'h en kroaz war boull he c'halon, e-giz ur c'harc'harour.

Vasili a glaskas teurel ur sell war-du e vuiañ-karet, met treiñ kein a reas Koncha ha kregiñ da daboulinat gant he bizied war werenn ur prenestr. N'en devoa ket ar paotr yaouank klevet petra 'oa c'hoarvezet en kêr an deiz-se, ur sulvezh moarvat evel ar re all ; koulskoude en ur bignal eus ar c'hae betek straed ar Mabig Jezuz, en devoa kejet gant gedourion-nor niverusoc'h ha marteze kintusoc'h eget kustum.

— Aotrou rener, emezañ, pedet on bet da zont hep dale dirak ar c'huzul-meur.

E-mesk ar c'helaouennoù berniet war un daolig dirazañ, e e tapas El Lobo « *Las Informaciones* » hag hep ranañ ger ec'h astennas anezhi a-benn brec'h etrezek ar studier. Raktal en devoa Vasili intentet e pebezh stad arvarus e oa kouezhet hep gouzout dezhañ ; war bajenn gentañ ar gazetenn e wele e boltred-eñ stok ha stok ouzh hini Don Kristobal Hernandez ha dindan e oa skrivet kement-mañ :

UR GWALL-DAOL SPONTUS A-ENEP DA DAD
AR VRO HAG AR BOBL. — *Ar beure-mañ, war-dro unnek eur, pa oa an ambrougadeg o tivoukañ war Vali an Araokadur, en deus un amprevan tennet c'hwech ha gwech taol ha taol gant ur bistolenn war ar Prezidant holl-garet p'edo hemañ o vont da zigeriñ ar palez nevez grouet gantañ ha kinniget da rummadoù tud da zont. Da c'hras Doue ne voe gloazet den nemet ur c'habiten war varc'h eus ar Gward. A-drugarez d'ar reuz ha d'an trubuilh a savas e-touez an dud o sellout, e c'hellas an torfedour, Pablo Cabrera, triwec'h vloaz, deskard en ti ur mouler, en em silañ kuit. Er rouestl-straedigoù ha banelloù o tiskenn betek ar porzh-mor, e vije moarvat deut a benn da ziñlipañ rak ar vrogarourien o redek war e lerc'h, panevet d'an Aotrou Vasili Goloubienko, daou vloaz warn-ugent, mab repuidi eus Bro-Ukraino, e Skol-Veur ar gêrbenn. Hemañ, hep aon rak ar bistolenn vuket warnañ a ziskaras ar gwall-oberour gant un taol troad. Da verkañ sklaer ha splann anaoudegezh-vat ar vroad a-bezh en e gêñver, eo bet dija digoret e burev Las Informaciones hag ar c'helaouennoù all ur c'hef evit goprañ hervez m'eo dleet ar brogarour taer-se.*

— Ac'hanta, brogarour taer, e c'houlennas El Lobo, daoust ha stad a zo ennout ? Mat e vefe din moarvat paeañ va skodenn e burev ur gazetenn bennak ?

— Va digarezit, Aotrou rener, a haketas ar paour kaezh, ne ouien ket e oac'h en sell da zistrujañ ar Prezidant !

— Hag abaoe pegoulz e tle ar c'huzul meur displegañ e venozioù dirak kement ezel emrollet gantañ ?

— Me 'grede din am boa d'ober gant ul laer, hepmuiken !

— Gant ul laer ! a grias ar banker Garcia, droug bras ennañ. Biken n'am bije kredet e vefe en hon touez dispac'h-erien na glaskont nemet diwal danvez ar vourc'hizien !

— Trawalc'h gant ar seurt tabut ! a droc'has krak ha krenn El Lobo. Hirie, he deus Koncha Kasteler graet div gefridi a-bouez evidomp-ni : da gentañ, he deus war va c'hourc'hemenn roet ar bistolenn d'ar paour kaezh Cabrera...

— Ar genaoueg-se, e vlejas ar jeneral, n'eo ivez nemet ur Juzaz, rak c'hwitet en deus war e daol.

— ...Ha d'an eil, he deus aliet an dañvad tagnous-mañ da zont dirazomp. Dre se, eo pedet da varn a-gevret ganimp e c'henskoliad. Ac'hanta, Koncha, pebezh kastiz a dibabez evitañ ?

— Ar marv ! e lavaras ar plac'h yaouank, hep chom da dermal.

Pemp mouezh all a zistagas an hevelep gerioù ha d'an diwezh e tisklerias kement-mañ El Lobo.

— Klevet hoc'h eus, Goloubienko ? Diwallit da dec'hout diouzh ar gêrbenn pe d'hon flatrañ d'ar polis. Hon brec'h a zo hir hag hol lagad a zo lemm ; gant se e vefec'h tapet ganimp, n'eus forzh pelec'h e fellfe deoc'h klask un toull-kuzh.

— Gwelloc'h e vefe marteze e ziwadañ war an taol ? e c'houlennas Fray Vincente en ur dennañ e-maez e c'hodell ur gontell hir-hir, lemmoc'h eget un aotenn.

— E ziwadañ amañ ? e skrijas Dona Kristina en ur sevel he divrec'h d'an nec'h. En anv Doue, Vincente, tav dimp gant ar seurt komzoù, pe gollet az pefe da spered ?

— Ar wirionez a zo ganeoc'h, va mamm, eme he mab tener ha doujus.

Herr warnañ, edo dija Vasili o tiskenn gant an diri rak ne bade ket gant ar, c'hoant pellaat diouzh an dud-se na oant, hervez ma krede dezhañ betek-hen, nemet keneiled feal.



E zivrec'h hag e zivhar staget gant lerennoù ouzh treid an daol, hag e gorf ledet warni en doare ma vefe aezetoc'h troc'hañ dezhañ e c'houzoug, e oa Vasili gaezh o c'hortoz bezañ lazhet. Petra bennak m'en devoa klozet e zaoulagad e ouie piv 'oa e vourevien : Koncha eveljust hag an hini-gozh. Klevout a rae en e gichen Dona Kristina o lemman, frrr... frrr... ur gontell dall war ur maen-higolen.

— Ac'hanta, va flac'hig, eme ar wrac'h, daoust ha n'ac'h eus ankounac'haet netra ?

— Kemeret am eus va diarbennoù : ur sailh a zo dindan e benn da zastum e wad, ha gant ar bilhenn-mañ e vo stouvet e c'henou mar deufe dezhañ c'hoant blejal.

Gant evezh e kendalc'he mamm El Lobo da lemman he benveg... frrr... frrr... frrr... hag ar chourig-se a zeuas a-benn ar fin da vezañ ken enkreuz, ken spontus ma ne voe ken Vasili evit padout pelloc'h. Harpañ a reas e ilinoù war an daol hag a-stroñs e savas en e goazez. Kerkent ha ma tigoras e zaoulagad, e welas ne oa den-all ebet nemetañ en e gambr, hag en em gavas evel boaz war e wele. Met an noz diwezhañ n'en devoa ket kemeret ar boan da ziwiskañ e zilhad kent

mont da gousket. Hogen, edo unan bennak o strivañ da silañ ur baperenn dindan an nor hag an drousig-se, frrr... frrr ; frrr, a oa heñvel a-walc'h ouzh hini ul lavnenn o wigourat war ur maen. Gallet en divije Vasili tapout an torr-penn war e ched rak e glevout a rae c'hoazh o ruzañ e solioù war ar pondalez. Met da be vat ? Barnet e oa dija d'ar marv ha kerkoulz ha graet e oa 'ta e stal...

Kerkent ha savet e lennas ar paotr yaouank an div linet merket gant liv ruz war an tamm paper-se : *Fallakr a zo ac'hanout ! Aet eo an noz-mañ Pablo Cabrera da anaon, en em grouget en e gell er c'hreñvlec'h. Gwazh a se dit !...*

Diwezhat a-walc'h e tlee bezañ dek eur bennak d'an nebeutañ. An heol a skigne ur boultrenn alaouret a-dreuz kement toullig e stalafou prenn ar prenestr. Er pellder e tregerne c'hoarzhadeg, kaniri, stlakadeg daouarn gant boubou melkonius an akordeoñs. Ur pennadig e ohemas Vasili da sellout ouzh an nebeut a draoù en e gerz : un toullad levrioù-skol ha kaieroù, berniet war un daolig mastaret gant liv, ur stlabez dilhad marc'had-mat, ur gador, ur gourvez-bank hanter vrevet, ur mezelour dilufr, saotret gant kaoc'h-kelien, ha war dumenn ar siminal skeudenn Viktoria, rouanez Bro-Saoz, e pri melen, a-us d'un daol-emwalc'hiñ stok ha stok ouzh ur pod-kambr merglet. A-hed ar mogerioù e rede direde pikoloù c'hwiled du ha gant o zreid blevek e raent un drouz heugus, hini ur barr grizilh a tiflakañ war un doenn vein glas. Peget ouzh ar solier, e ruze ur glazard o c'hedal ur fubuenn bennak, ha mezhe ebet n'en devoa al loen-se ha marteze zoken e oa lorc'h ennañ en desped d'e zaoulagad dislontret, d'e d'e gein peliet ha d'e c'horioù hudur.

« Sed amañ 'ta, eme Vasili, al lec'h ma raen dioutañ « ar ger » al lec'h ma tistroen ennañ diwezhat en noz goude ur valeadenn gant Koncha, ha tridal a rae neuze va c'halon gant ul levenez dispar, rak menel a rae c'hoazh war va muzelloù blaz c'hwec'h he fokoù. Daoust hag heñ e vefe kerse ganin o pellaat diouzh va siklud dibalamour, diouzh ar vuhez a-bezh, ha diouzh an drubardez n'am eus bet diganti nemet pokoù Juzaz ?... »

Stagañ a reas an den yaouank da gerzhout dizaon en arbenn d'e donkadur. E traoñ ar viñs e voe roet dezhañ ur baperenn all, degaset, eme ar porzhier, gant un archer : « *Pedet eo an Aotrou Goloubienko Vasili da zont hep dale da burev ar C'homiser* ».

Tomm e oa an amzer an deiz-se ken na oa ; an ter-du ma oa

libistret gantañ ar straedoù a deuze dindan dreid an dremenidi ha dindan rodoù ar c'hirri. Kerkent hag aet e-maez an ti, en devoa Vasili merzet Fray Vincente, gant e gontell en e zorn, oc'h ober neuz da varc'hata ur sukrinenn-dour dirak ur stalig. Eeun ha sonn e kendalc'he evelkent da vont gant e hent, evitañ da vezañ da bep mare en gortoz da santout en e blankenn-skoaz yenion ul lavnenn dir, stlepet a-dro jouez hag adreñv e gein. Pa zifloupas e penn ar vali, nepell dirak an ti polis, e welas Fray Vincente o treuziñ al leur-gêr a gammedoù hir, da guzuliañ gant ar jeneral Arequipa en e goazez dirak ur pezh pikol gwerennad rom gwenn.

Ar c'homisar Don Ruiz Penafior a oa en gwirionez ur ramz. Gleb dour e oa gant ar c'hwezenn, ken pounner ha ma tlee bezañ e gasketenn, e vedalennoù diniver, e wiskamant mezher glas hag a daole c'hwez an naftalin hag an tro-heol. E heuzoù ler melen a dape dezhañ betek e vorzhed ha gant e zorn a ledander gant un asied e waske didruez war groaz alaouret e sabrenn gromm.

— D'ar c'hanfard-mañ, e soñjas Vasili, e tenne emichañs Holophernes gozh.

— Aotrou Goloubienko, eme ar ramz, gourc'hemennet eo bet din ho kas ar primañ gwellañ dirak Tad ar Vro hag ar Bobl, rak ne bad ket Don Kristobal gant ar c'hoant ho meuliñ hag ho trugarekaat evel m'eo dleet.

Souezhet mik e vanas Vasili. N'eo ket hepken o klevout ar seurt gerioù iskis, met dreist-holl o vezañ m'en em sile diouzh ar bern kig, soav, hag eskerne-se un tamm mouezhig voan-voan, mouezh ur spez.



Bremañ, e oa bodet kuzul meur an Dispac'herien en un tiig disteroc'h c'hoazh, ha pell-pell diouzh straed ar Mabig Jezuz. Ur pennad 'oa, he devoa Dona Kristina feurmnet an ti-se dindan hec'h anv plac'h yaouank, rak dalc'hmat en em zibabe da gaout, en a-raok daou pe dri lojeiz kuzhet ouzh an izili all ha da gentañ ouzh ar polis, en doare ma c'hellje tec'hout a-ziwar wel gant he c'henwallerien, kerkent ha ma teuje da vezañ tenn warno.

Al lun-mañ, e oa ar wrac'h o kantreal war-dro en ur sevel he fri, hag he divskouarn digor mat ganti evit gouzout raktal ar c'heloioù diwar-benn diarbennoù ha troioù-ijin paotred ar gouarnamant. E kav e doull-kuzh, e gein harpet gantañ

ouzh ar voger c'hleb na baoueze ket ar jeneral Arequipa, leun e gof evel boaz gant rom gwenn, da douiñ Doue pe da veogal e nerzh e benn : « Soudarded !... bukit o fuzuilhoù ha... tennit ! » evel pa vije bet pedet da ren ar re garget d' e lakaat d' ar marv. El Lobo a stoupe ar gwellañ m' helle e zivskouarn evit chom bouzar ouzh blejadennoù ar mezvier, ha bale a rae gwall izel gantañ e gribenn, a-hed hag a-dreuz ar c'hav hep teurel pled ouzh ar boultrenn glaou douar a saotre ar pantouflennoù kaer kinniget dezhañ nevez 'oa gant e vamm garet. En e gluch war ur varrikenn c'houlou e sardonne Fray Vincente regennadoù gerioù displann, mallozhioù mesk-ha-mesk gant litanioù ar Sent. Ken difiñv, ken difrom hag ur peul e selle pizh ar banker Garcia ouzh ar gwiad kevnid tev en pign ouzh an treustoù lous. Pebezh truez evelkent !... kaout en e gerz tri garr-dre-dan en tailh da skarañ ken prim hag ul luc'hedenn, daou garr-nij hag ul lestr bale gant ur bern martoloded war vourzh, hep gallout en em silañ e-maez ar vro na dre vor na dre zouar, rak a dra sur e oa bet stouvet an holl harzoù kerkent ha ma teuas ar polis da c'houzout anv an Dispac'herien, flatret gant ar Goloubienko milliget-se.

A-daol-trumm e klevjont tud o redek a-us dezho ha ken skeltr e oa an tiig koad se ma skloke evel un daboulin ha ma kredas da bep hini e oa ur strollad archerien ha soudarded o tiskenn ken ma findaone o zreid gant an diri.

— Tapet omp ganto ! e vlej as ar jeneral Arequipa en ur horellañ ur bistolenn, en sell d' en em lazhañ, met raktal e sailhas an tri all warnañ evit lemel digantañ e venveg rak evel-just kerkent ha ma weljont ur bistolenn e stagfe kanfarded ar polis da dennañ didruez hag hep sellout berr.

Dor breñveded ar c'hav a zigoras a-stroñs ha setu ma teuas tre Dona Kristina. Ken berr e oa warni ma n' helle ket distagañ ur ger met a benn brec'h e heje ur gazetenn nevez voulet ma lenned warni ar c'heloù-mañ :

Skuilhit daeroù, kenvroiz gaezh, rak aet eo da anaon Tad ar Vro hag ar Bobl, lazhet gant ar studier Vasili Goloubienko, e-keit m' edo, daoubleget a-us d' e zaol-skrivañ, o sinañ evit ober plijadur d' ar muntrer, ur skouerenn eus e benn-oberenn « Diarbennadurioù ». Gant kement a nerzh e voe skoet an taol gant kontell-baper Don Kristobal ma torras al lavnenn war ur gostenn. Raktal e laoskas Don Alonzo Mendoza, Ministr an Deskadurezh, tri denn pistolenn e penn an torfedour, met siwazh peurc'hraet e oa an taol. Bodet eo izili

ar gouarnamant da zivizout kenetrezo ar pezh a zo d' ober evit salvedigezh ar bobl. Met da c'hortoz, gourc'hemennet eo bet fuzuilhañ raktal an holl re dalc'het er mare-mañ e kement toull-bac'h, kell karc'har ha kreñvlec'h ar vro. Sursum corda evelkent ! ha ra gendalc'ho ar bobl da vont gant an hent lorc'hus diskouezet dezhi gant Don Kristobal.

— Peogwir, eme El Lobo, en ur c'hoarzhin yud, eo krog ar c'henaouien-mañ d'en em zistrujañ an eil egile, e tiskleriin deoc'h kent na vo pell digant piv e vo mat dimp lemel e vuhez.

Met Don Esteban Garcia ne oa ket chomet da selaou. Skarañ a rae a gammedoù bras rak pa darzh un dispac'h ha pa ne darzh ket, kentañ tra en deus ur banker d' ober eo plediñ gant e vadoù hag e baour kaezh arc'hant.

Krec'h Eliez, 24-1-63.

Skol-louarn

Veig Trebern

gant Youenn DREZEN

(Pennad)

Veig Trebern a zesk istor e vro
gant ur goñchennerez gozh

PELLOCHIK ha lec'h e oa an estrebed ⁽¹⁾ en e enkañ abalamour d'ar strouezh, atav, — an tamm hent don-se ne veze ket lakaet alies beon pe falz en e greouichenn, — e oa stanket da vat ouzh hor boudedeo. Ingalik e c'hoarvez evel-se, pa vez mall gant unan mont e-biou. Kemeret e oa an tremen en e lec'hed gant ur pezh mell liñseriad delioù pin, o vont dirazañ, ur pikol choukad delioù pin sec'h, gant ur rastell goad plantet e-barzh ; ront e-giz ur baloñs, ledanoc'h eget penn a-dreñv ur vuoc'h, hag uhel, hag o c'holoiñ kein an douger betek traoñ e zargreiz. Ha brañsellig a oa ganti, evel gant penn a-dreñv ur vuoc'h o vont war-raok bravik ha dibrez.

Kerzhout a reas Veig d' he heul, o c'hedal ar poent d' en em silañ etrezi hag ar c'harzh spern.

Sevel a rae ur vouezh eus al liñseriad delioù pin. Tonigenniñ a rae war un ton boud ha gorrek, mes fraezh ⁽²⁾ :

Petra zo nevez er Gêr-Is,

Ma'z eo ken foll ar yaouankiz ?...

Ul liou roc'hellek d' ar vouezh ; ha daskrenañ a rae e-giz hini ur paotr kozh.

Mes n'eo ket un den e oa, peogwir e oa lostenn gant douger ar choukad. — Hag, a-hend-all, biskoazh n'eo bet gwelet un

(1) Estrebed = straed, hent strizh, gwenodenn.

(2) « Authentique », evel ma lavarer e galleg.

den o tougen ul liñseriad delioù pin. — Skeiñ a rae, da bep kammed, al lostenn dakonet, a oa bet ruz gwechall, war ziv c'har askornet savaj ha diloer. Koeñvet e oa an ufernioù, diwevn, ha kramenn warno. Aet 'oa rez ar botoù koad. Hounnezh 'oa ur vigoudenn gozh, bet er c'hoad o rastellat peadra disklaouañ tan, a-benn ar goañv. Ha dichal gant he samm, moarvat, peogwir e chome dezhi anal a-walc'h da c'hourganañ gant he mouezh gwrac'h :

Gralon, Gralon, laka evezh
En dizurzhioù a ren Ahes,
Rak tremenet vo an amzer,
Pa skuilho Doue e goler.

Anaout a rae Veig ar ganaouenn. Klevet en doa e vamm, meur a wech, pa veze o wriat, pe gant he stamm, o tistagañ anezhi, ha gant ur vouezh un tamm mat bravoc'h. Ha brav e kave, ton ha son, istor ar Gêr Veuzet, pa planedenn ar Plac'h Yaouank, a voe taolet er mor, abalamour d'he fec'hedoù, hag e teuas dezhi ul lost pesk e lec'h divesker. Mes ne oa ket ennañ, hiziv, ene an dastumerien gwerzioù, Kervarker pe an Uhel, na pasiañted da reiñ skouarn betek ar fin. Ret gouzout, ma n'ouzoç'h ket, ez eus daou boz ha tri-ugent, a beder linenn pep hini, e « Gwerz ar Roue Gralon ha Kêr-Is ». Ar pezh a ra, ma ouzomp niveriñ, daou-c'hant eizh ha daou-ugent gwerzenn.

Ne zifluke ket buanoc'h ar pozioù eus gourlañchenn ar varzhez-baleerez eget n'ae he zreid koeñvet war-raok. Veig, eñ, e oa prez warnañ.

N'oa ket uhel ar vaouez kozh war he divc'har, ha daou-bleget e oa, ouzhpenn, dindan he samm, Veig, kennebeut, ne oa ket uhel, mes gwevn e oa, e-giz ur silienn. Tremenn a raje dre zindan al liñseriad delioù pin. Ha va faotr ha stouiñ e benn ha war-raok, dre e zaoubleg... evit sevel trumm e gein ha disvantañ reutañ taol-penn, e vountas biskoazh, el liñseriad, dres p'edo erru dindan.

Krennet ar c'hantig, ken trumm all, da reiñ plas d'ur grozadenn :

— A, feiz ! korrig Gwaremm-Gion. Kichenik e oan pilet gantañ. N'out ket evit teurel evezh, apre tamm traoù !

Ma vije bet Veig Trebern gant paotred all, e vije redet kuit en ur c'hoarzhin-goap, hag huchet : — Gast kouzh ! — marteze, war ar gozhiadez d'he lakaat da fuloriñ muioc'h

c'hoazh. Hogen, pa veze e-unan, e oa anezhañ ur bugel savedik-mat. Ober a rae tro d'en em zigareziñ :

— 'M eus ket graet « espres », moereb, emezañ. An drezenn an hini a zo kaoz.

— An Drezen ?... Peseurt Drezen ? eme ar vaouez kozh.

Savet he doa he daoulagad a-ziwar mein an hent. Dourennek e oant. Sellout a rae Veig outi dindan he fri. Un dourenn a oa ivez ouzh penn he fri ; ha merzout a rae he fas roufennet, goloet gant darvoued rouz ha trouskennoù.

— Oi ! emezañ. Hounnezh 'zo kozh, 'vat ! Hounnezh 'zo kant bloaz koshoc'h evit « mamm-gouzh » Menez Piked...

Ne oa ket liv ar skuizhder warni, evit-se. Ne bouez ket nemeur, hervez ar mod, an delioù pin kras. Dougen a rae ar pikol samm anezho en ur pezh liñser rouez rouz, staliet klok war he c'hein, ha dalc'het ouzh he zal dre bevar c'horn al liñser skoulmet a-gevret. Ma oa kruk he c'hein, n'eo ket gant ar remm e oa, mes abalamour d'ar c'hempouez.

— Peseurt Drezen ? eme ar vigoudenn gozh. Eus an Drezennek e kaver e kement toull-karr a zo er c'hanton. Mes ne welan nemedomp hon daou war an estrebed. Ur paotrig all o oa ganit ?

— N'eus ket 'vat, moereb. Me 'm eus laret an drezen gant pikoù lemm, an drezen gant mouar du. Pa 'm eus stouet va fenn da baseal dindanoc'h, 'm eus manket dallañ va daoulagad gant un drezen, a zeue a-dreuz an hent.

— Neuze 'ta ! va faotr bihan paour. Setu penaos e c'hoarvez droug gant ar vugale...

« Mes, na chom ket plantet aze, dirazon. Te 'wel pegen samm et on. Bale dirak !

— Ya ! moereb.

N'eus ket d'ar vugale ha d'ar gozhidi d'en em glevout eus ar c'hentañ ha da ober buan anaoudegezh. Ha kuit, o daou, war o fouez, dre an hent strizh, Veig dirak gant e sac'h-skol, ar vigoudenn gozh d'e heul gant he choukad delioù pin sec'h.

— Diouzh pelec'h emae o tont ? eme ar vaouez kozh, a-benn ur reuziad. 'Mañ ket amañ hent ar skol.

— Nann ! Me 'oar, moereb, eme Veig. Me zo bet e ti ur voereb din, e Traveneg.

— A, ya ?... Te 't eus kerent mevelien, er maner ?

Darbet 'voe da Veig respont e oa niz da Itron ar Maner, mes ne vije bet kredet gant eben gozh. Bugale ar manerioù e vez lakaet dezho botoù ler. Respont a reas :

— Ya ! moereb.

— Eus Pont-'n-Abad out, va faotr bihan ?

— Ya ! moereb. Eus Brengall... kentoc'h, eus Menez-Roz ar C'hastell.

— A, ya ? Anaout a ran kalzik tud, er Menez-Roz. Da biv out, va faotr bihan ?

Skrabat a rae Veig e benn.

Taolet en doa, evel-se, anv karterioù ar pellañ eus kêr, gant ar soñj ne yae ket morse, keit-all, ur vaouez ken oadet. Arabat oa komz eus ar Waremm-Mên, eveljust, ha diskleriañ e anv gwir, en aon e vije anavezet gant ar vaouez kozh, ha topinet ganti, tro pe dro. Re guriüs an holl e oa ar vaouez kozh-se. Fentet en doa eta va louarn ur gaouig, — peogwir eo soutilañ kefridi al lern diankañ ar chaseourien, — gant ar soñj ne vije ket aet hiroc'h an diviz. Ar vaouez kozh, avat, ma oa gwall-samm war he choug, e oa skañv he zeod, ken e oa, ha danvez ur c'hofesour enni. Hep gouzout dezhi, moarvat ; hep soñjal e droug, ken sur all. Ken nemet evit ar blijadur drailhañ un tammig flep gant ur paotr bihan, ha kaout berroc'h an hent.

Hag ar « paotr bihan », pa oa bet rouestlet e deod gantañ en e c'haouig kentañ, e oa ret-mat dezhañ ijinañ kerent nevez, un tad hag ur vamm a faltazi, hep tra da welout, dreist-holl, gant an Trebern, mañsoner traoñ ar Waremm-Mên, ha Mari-Gorantina Menez-Piked.

— Va zad a zo Prosper Gwiader e anv, eme Veig. Ha va mamm...

— Gwiader ?... Gwiader ?... eme ar vaouez kozh. N'anavezan Gwiader ebet er Menez nag e Brengal. Kouls-koude...

— O met, a droc'he an Herve, primik. Va zad ne vez ket morse er gêr. Va zad 'vez atav o navigañ ; eñ 'vez er mor, war ur vatimant vras.

— Gwir 'ta, eme ar vaouez kozh, evel eviti hec'h-unan, mont a ra unan divemor, dre ma ya war an oad. Ha gwir eo ivez eo anavezet muioc'h ar gristenien dre o lesanvioù eget dre o anv-badeziant. Ken gwir ha ma vez graet ac'hanon-me Marjan ar Gernez, daoust din bezañ ur Gerdranvadez, ha bet ur bennhêrez a don...

« Penaos eo lesanvet da dad, va faotr bihan ?

— N'ouzon ket, eme Veig.

Gwelloc'h oa treiñ kaoz. Ha, ken kurius hag eben :

— Fi zo kouzh (1), moereb ? eme Veig, a-drak.

— E ! e ! e ! e !... eme « voereb » an delioù pin, gant he c'hoarzh groz daskrener, ha sart, daoust da se. N'emaon ket mui e fleurenn va yaouankiz, va faotr bihan. Ha perak 'ta e c'houlez va oad diganin ?

— Abalamour d'ar jañson e oac'h o kanañ bremaik. C'hwi 'p eus anavezet ar roue Gralon, moereb ?

— 'Vez ! 'vez ! va faotr bihan. E pelec'h e vezet o prenañ da sistr ? Bevañ 'rae ar Roue Gralon, en amzer ansien, ma oa an diaoul paotr « bihen », en amzer ma veze gwelet ar gorriged o tañsal ar gavotenn, e-kreiz koadoù derv plasenn ar Vadalen.

— Gwez derv 'oa war blasenn ar Vadalen, moereb ?

— Setu pell 'zo !... Ya ! 'vat, setu pell 'zō ! N'on ket yaouank mui, me a-viskoazh 'm eus gwelet tiez uhel en-dro d'ar Vadalen... Sada !... Lakaat a rez ac'hanon da larout sotonioù... Pa voen ganet, ne oa koc'hu ebet e-tal ar Vadalen, na ti na tra, nemet ur wezenn bennak ha parkeier, eus ar Vadalen da Benn-ar-C'hap. Ar 'Waremm-Mên n'oa nemet ur waremm, ha ne oa nemet pupli e foennijiri (2) karter Pont-Gwern. Kêr a oa er Marc'halloc'h ha ru Kereon, da vont war-du ar C'hastell hag iliz Karmez. Frankaet eo kêr, un tamm mat, abaoe, ha bourrus bevañ enni. Mes, gwechall gozh-gozh, ne oa ar vro nemet koadoù don, gant bleizi ha moc'h gouez, va faotr bihan paour. Hag ar gristenien, n'ouzon ket petra o doa da dorriñ o naon. Ne oa bet klevet anv morse ganto eus kaol-irvin, ha m'en dare hag eñ e oa anavezet ganto blaz ar bara segal ha soubenn ar rouz.

— Ne gavan ket mat soubenn ar rouz, eme Veig ; dre benn d'an ognon.

— Neuze, n'ouzez ket petra zo mat, eme ar vigoudenn gozh. Te zo ur beg mitou. E ! e ! e !... Ma ne zebrez ket soubenn ar rouz, ne ri ket da gresk, ha ne zeuy ket da zen. Bremañ eo re vaget ar vugale. Gwechall e oa an dud reuzeudik da chikañ gant ar mailh. Me va-unan, me ouie petra oa an dienez...

— Koulskoude, 'gleven ac'hanoc'h o kanañ, eme Veig ; ha bremañ, e c'hoarzhit. Koulskoude...

(1) Fi zo kouzh = doare tud Pont-'n-Abad da zistagañ : C'hwi 'zo kozh.

(2) Foennijiri = liester bigoudenn, evit « fenneier ». Lavaret 'vez ivez « estrevijiri » e-lec'h « estrebedoù » = hentoù-karr, gwenodennoù.

— Joa da vezañ bev, memes tra, va faotr bihan, joa da vezañ bev atav...

— ...Koulskoude oc'h kozh, eme Veig. C'hwi 'zo ken kozh ha Napoleon ?

— Ar paotr Leon ? eme eben. Pehini ? Breur Felist Moizan, ar marc'hadour boeson, eus ru Kereon ?... N' oa ket tost da vezañ ganet, an den kaezh, pa...

N' oa, tamm ebet ponner-glev ar vigoudenn gozh. Ha n' eo ket d' he skouarn eo e oa da damall ar fazi war an anv. D' an doare-distagañ, ne laran ket. Du-mañ eo prim an dud gant o frezeg. Ken prim, ma chom a-ispilh ul lodig mat eus korf ar c'homzoù. Lonkañ a reer, a-hed ar wech, silabennoù a vez, ar c'hensonennoù, dreist-holl. Ar ger « paotr », da skouer, peogwir emaomp gantañ, a zeu da vezañ « pot ». Ma 'n em gav ur gensonenn dirazañ, « l » al Leon, da skouer, peogwir emaomp gantañ ivez, krennet e vo krenn e « po ». Ha setu « ar paotr Leon » stummet en « a' po' Leon ». Deoc'h d' en em zibab, adalek se, etre breur ur marc'hadour gwin bigoudenn hag Erer Austerlitz.

Ne oa ket eta hon daou varvailher o peuriñ war ar memes tachenn.

— Nann ! eme Veig. Me « breg » eus Napoleon. An Impalaer.

— A ! a !... an Apoleon ? Mes eus pehini ? Daou Boleon int bet. Ar Poleon Kentañ, an hini a oa aet gant e soudarded da c'hwezhañ an tan en ur gêr vras, du-se, pell, e-kreiz an erc'h, er sav-heol ? E Rusi ar c'haol kozaked, ma 'm eus komprenet mat. Hennezh a oa ur c'houil. Nann, va faotr bihan, 'm eus ket anavezet ar Poleon-se. Egile, avat, ar Poleon, a dapas e damm digant Bismarck hag e Brusianed laer, — ra skorno ar c'haoc'h en o reor ! — ne oa ket anv anezhañ c'hoazh, pa voen lakaet war an douar gant va mamm baour — Doue d' he fardono ! Dimezet e oan, — ur vouilhez merc'h nevez e oa ac'hanon, m' hel lar dit, — hag intañvet zoken gant ur c'hrubuilhad minored, pa zirollas warnomp ar brezel Dek-ha-Tri-Ugent. Ur brezel reuzeudik, Doue ra viro !... Mes va gwaz-me en doa lezet e vuhez, pemp bloaz a-raok, en ur brezel all, e Sebastopol.

— Lazhet eo bet er brezel, moereb ?

— Nann, va faotr bihan, lipet gant ar vosenn. Ha, bremañ, e c'hellez ober ar gont eus va bloavezhioù.

— N' eo ket ur gont aes da ober, eme Veig. N' on ket mat war ar « rimitik ».

— Pemzek ha tri-ugent abaoe gouel Maria Hanter-Eost... Ha, te wel, grën ha rafin, atav, merc'h va mamm baour ; ha n'eo ket ouzhpenn din ur choukad delioù pin. E ! e ! e ! e !... Ma welez ac'hanon dre va daoubleg, n'eo ket abalamour d'ar samm a zo war va c'hein. N'ouzon ket petra eo ar remm. Gwechall...

— Pet eur eo, pelloc'h, moereb ? eme Veig. A-benn neuze, e wele ar paotrig dirazañ talbenn gwennrazet ti bihan Keratur. Klevout a rae ur vioc'h o vuzellat, er c'hraou.

— Feiz, va faotr bihan. N'ouzon ket pelec'h emañ an heol, gant ar c'harzhad spenn uhel-se, ha n'eo ket aes din sevel va fenn gant va bec'h delioù pin. Krediñ 'walc'h a rafen emamp e tro peder eur.

— O ! moereb. Neuze eo poent din redek d'ar gêr. Va mamm 'n eus laret din e ranken bezañ er gêr, a-benn peder eur.

— Troc'h kuit, neuze, va faotr bihan. Galoup gant Doue hag ar Sent !... E ! e ! e ! e !...

— Klok ! klok !... Klok ! klok !... Klok ! klok !... eme votoù koad Veig Trebern, o piltrotat war an hent kalet. Ur mod d'e votoù da lavarout ar c'henavo n'eo ket bet lavaret gant o ferc'henn, kement a bres e oa warnañ, en ur gimiadiñ ouzh e anaoudegezh nevez, ar goñchennerez gozh.

Istor ha Lec'hanvadurezh

gant T. JEUSSET

EN ENVOR ABEOZEN,
KENSTOURMER FEAL.

LODENN GENTAN

SKIGNEREZH AN ANVIOU-PARREZIOU O TERAOUIN GANT PLOU-, LANN-, LOG-, LEZ-, TREV-

I. — Ur sell ouzh kartenn Vreizh

Pa dreser war ur gartenn an anvioù-parrezioù o teraoiñ gant *Plou-* ha gant *Lann-*, e verzer tri c'helc'h bras a zo dibourvez anezho. — A) E Breizh-Izel - 1^{añ} : war ul linenn e kroaz *St Tegoneg-Pleiben* ha *Daoulaz-Skrignag* ; 2^l war ul linenn e kroaz *Kerahez-Fouenant* ha *Brieg-ar Faoued* ; 3^t e kroaz *St Tegoneg - Pleiben* ha *Daoulaz - Skrignag* ; 2^l war ul linenn e kroaz *Kerahez - Fouenant* ha *Brieg - ar Faoued* ; 3^t tro-dro Pondivi, war ul linenn e kroaz *Ploue - Uzel* hag ar *Gemened - Kaez* (1). — B) E Breizh-Uhel, e-lec'h ma komzed brezhoneg gwechall, ez eo heñvel : 1^{añ} e geunioù Dol ; 2^l tro-dro Redon, en hanternoz d'ar gêr-se betek *Ploulann-veur* hag adalek *Plouarzel B.-U.* betek *Landegon* ; 3^t e ledenez *Gwerann*.

Kavout a reer e Breizh-Izel, e-barzh ar c'helc'hioù-se : 1^{añ} ar *Fouilhez, Skrignag* ; 2^l *Roudouallec*, gwechall *Rodoed-gallek* (2) ; 3^t *Noal* (Pondivi) ; *Loudieg* (3) ha *La Chèze*. — Anat eo levezon ar galleg kozh pe ar romaneg, mar kirit, war an holl lec'hioù-se.

(1) La Chèze e galleg.

(2) Chrestomathie.

(3) *Lucoteiacum*, gouez da Loth.

E Breizh-Uhel, e lec'h ma voe mouget abred ar brezhoneg, e kaver : 1^{añ} (arabat treiñ e brezhoneg amañ !) *Chertueix* ha *Bonnemain* ; *Brain* (gwechall *intula Plaz* pe *Venezia*, lec'h ginivelezh eskob gall-roman Roazon e mare enbroerezh ar Vrezhoned) ; *Baen-meur* (lec'h ma kounae ar gouerien eus maread ar Romaned, en IX^{vet} kd c'hoazh) ; *Saillé* hag e-kreiz ar maezioù *Plessé* (ne gredan ket ez eo ur plou daoust d'ar furm *Plebs Sei*).

Peogwir ec'h ouzer e voe annezet da vat ar Vrezhoned e ledenez Gwenrann *adal eil hanterenn ar VI^{vet} kd* (Loth o venegiñ Gregor a d-Tours) ez eo ret krediñ enta e voe savet ar parrezioù o teraouiñ gant *Plou-* ha *Lann-* a-raok an annezadeg-se. Ar re o teraouiñ gant Lann- a oa nevez-savet, gwirheñvel eo. *Da verzout n'eo ket anvet lann manati Dol savet en eil hanterenn ar VI^{vet} kd* ; nag abati Redon savet en IX^{vet} kd, kennebeut.

II. — Skignerezh an anvioù-parrez o teraouiñ gant PLOU

Skignet eo an anvioù-se a-hed aodoù an hanternoz, dreist-holl e broioù Leon ha Treger, koulz hag e traonienn ar Renz hag hini an Arguenon (Gwennaven ?). War aod ar C'hornog ez int bodet er vro-Vigouden hag e ledenez ar C'hab. N'eus *hini anezho etre an Oded hag an Elle*, evel m'en deus diskouezet an Ao. Falc'hun.

Merzout a reer, eta, enezennig romanek ar Fouilhez war gein ar menez Arre. Ar gompezenn eo (dreist-holl e bro Leon) a voe gounezet da gentañ gant ar brezhoneg. Tro-dro Pontivi ha beteg Kintin, n'eo ket eur *plou*, a-hend-all.

E Breizh-Uhel, ez eo dibaotoc'h c'hoazh al lec'hanvadurezh-se, nemet war aod an hanternoz. *Plou-* ebet : 1^{añ} e rannvro Zol (ne « *dreuzont* » ket ar Renz, koulz lavarout) ; 2^l e tric'hornbro an Dreinded - Menezkreñv - Maouron (Poutrekoad = *pagus trans sylvam* gwechall) ; 3^t e rannvro Redon hag e ledenez Gwerann. — A-hed ar stêr Winun betek hec'h aber, ne gaver nemet *Plougastell* B.-U. (Pléchâtel) hag a zo e unan-penn.

III. — Skignerezh an anvioù-parrez o teraouiñ gant LANN

Kalz diaesoc'h eo tresañ war ur gartenn skignerezh an anvioù o teraouiñ gant *Lann*. Anat eo ez int bet savet goude al lec'hioù o teraouiñ gant *Plou* ha bodet tro-dro dezho. O c'havout a reer niverus-tre e Goueled-Leon ha e tro Landreger. E rannvro Kemper ec'h heuliont an Elle hag an Oded. N'eus ket ul *lann* e bro-Wened — paneve war du aber ar Blawez hag hini stêr Intel hag unan bennak war ribl zehou an Elle.

Kavout a reer, avat, anvioù o teraouiñ gant *Lann*- pelloc'h na gaver ar re o teraouiñ gant *Plou*- e Breizh-Uhel. Peogwir ec'h anavezer doareoù al leaned keltiek hag o c'hoant da brezeg an Aviel d'o c'henvroiz dreist-holl, ez eo ret krediñ e oa Brezhoned annezet ken-abred e broioù Felger ha Gwizurieg pa savas al leaned *Landehan* ha *Lanavran*.

Klokaat a ra an anvioù o teraouiñ gant *Lann*- strollad an anvioù o teraouiñ gant *Plou*- e traonienn ar Renz hag ez int sanket pelloc'h egeto war-du ar vro romanek (*Lantrian*, *Langan*, *Langoad*, B.-U.). Dalc'homp soñj eus al lizher tamallus skrivet gant Melanius d'ar veleien vrezhon Louacatus ha Catihernus (dibenn ar Vvet pe derou ar VIvet kd). Ar re-mañ a zlee oferenniñ war-du Hazou, a-hervez.

Landegon a zo e penn an erv breizhat er gevred. N'eus nemet *Lampridic* - *Lambrizig* e bro-Naoned (hiziv Saint-Gildas-des-Bois).

IV. — Skignerezh an anvioù-parrez o teraouiñ gant LOK

Savet e veze ar parrezioù anvet *Log*- gant menec'h o loc'hañ eus o leandioù evit en em skignañ war ar maez ha bevañ pep hini ec'h unan, peurvuiñ. Nebeutoc'h eget al *lannioù* ez int deut da vezañ kumunioù... Ar venec'h o sevel penitioù a zo aet da c'hounid menez Arre, o kelc'hiañ enezennig romanek ar Fouilhez (1). A-hend-all ez int aet doun er maezioù war-du

(1) *Lokmellar*, *Logeginer*, *Lokmaria* (-Uhelgoad), *Logevred*, *Lopereg*.

Benac'h — o tont eus Bro-Dreger, a hañval din — (2) ha davet Kreiz an Arvorig pa zeuent eus aodoù Gwened (3).

Anat eo, dre ur sell ouzh ar gartenn ez eo bet savet al lec'hioù anvet *Log-* goude al lec'hioù anvet *Lann*.

V. — Skignerezh an anvioù-parrez o teraouiñ gant LEZ

Er VI^{vet} kd (eil hanterenn) e vennas Feliz, eskob Naoned herzel ouzh taolioù-preizhatañ dibaouez ar Vrezhoned. Mont a reas da welout ar penkadour Gwereg (*Waroch*) en ul lec'h anvet *Aula Quiriaca*, tost da Wenran. Ur brouenn eo e oa savet endeo *Lesguiriac* (doare-skrivañ ar Grenn-Amzer), anv-lec'h aet da get abaoe ar XVI^{vet} kd hag a voe brudet er XIV^{vet} kd gant Yann hag a lazhas Charlez Bleiz war dachenn-emgann Alre.

Al *lez*, ti ha kreñvlec'h an tiern a veze savet pell diouzh kêr (dalc'hit soñj e kare pennvrezelourien ar Vrezhoned, Morvan hag all, bevañ e-kreiz ar c'hoadeier). Deut eo al *Leziou* dibaot a-walc'h da vezañ parrez : *Brelez*, *Lezneven*, *Lezardreou*, war aodoù an hanternoz ; *Leziou* (Lizio e gwenedeg), *Lezmerzer* e sav-heol Gwened a zo skouerioù anezho.

VI. — Skignerezh an anvioù-parrez o teraouiñ gant TREV

Mar deo deveret Plou eus al latin *plebis*, eo deuet *trev* eus ar c'heltieg *treba* (meuriad). Savet eo bet al lec'hioù anvet *Trev-* pa 'z eo bet re boblek al lec'hioù anvet *Plou-*, emichañs. O c'havout a reer war aodoù an hanternoz, dreist-holl e broioù Leon ha Treger ; war c'hlann gleiz bae Sant Brieg hag e traonienn ar Renz (*e-tal geunioù Dol*). War aodoù ar c'hreisteiz e kaver ur strollad anezho e bro-Vigouden hag hiniennoù tost da Gemperle.

(2) *Logenvel*, *Logivi* (-Plougraz), *Lokarn*.

(3) *Lokmaria* (-Gregam), *Lokwelbaz* (-Gregam), *Lokmenec'h*, *Lokmalo*.

Da verkañ eo o deus « treuzet » an anvioù-lec'hioù-se harzoù ar vro romanek e Breizh-Uhel (evel al lannioù) rak kavout a reer Treffieux' (* *Trev-Eog* ?) ha *Trevou* B.-U., an eil e bro-Roazhon hag egile e bro-Naoned.

En enep, n' eo ket Tressé (bro-Zol) un anv-lec'h o teraouiñ gant *Trev-*. An anv latin *Tricciacum* eo, hep mar.

War a seblant, pa seller ouzh ar gartenn, ez eo bet savet al lec'hioù anvet *Trev-* diwezhatoc'h eget al lec'hioù anvet *Lann-* ; nebeut a vloavezh goude, marteze.



EIL LODENN

AN ANVIOU-LEC'HIOU GALIAN-ROMANEK DIBENNET GANT -AC

Pa seller prim e hañval bezañ rouez trevadennerezh ar Vrezhoned er rannvroioù ma ne gaver enno na *Blou-*, na *Lann-*, na *Lok-*, na *Lez-*, na *Trev-*. Koulskoude, kavout a reer e korn-bro-mañ pe hont anvioù-lec'hioù dibennet gant -Ac er skritur stad hag a destenn perc'hennañ ar Vrezhoned er Vvet kd, pe, d' an diwezhatañ, e penn-kentañ ar Vvet kd (Loth). Distaget int -eg bremañ e bro-Wened.

Strollet int peurvuiañ. Tresomp kelc'hioù war ar gartenn... Tro-dro Noal - Pondivi e verker : 1^{añ} *Malgeneg*, *Neulieg* ; 2^l *Silfieg* ; 3^t *Loudieg*. Tro-dro Maouron : *Brennig*, *Menieg*-uhel, *Merenieg* oc'h heuliañ *Maerilieg* - *Erieg* - *Roulieg* - *Sevinieg* — ar re-mañ savet er c'horn-bro ma kaver lec'hioù o teraouiñ gant Plou ha Lann... Tro-dro Redon, ez int niverusoc'h-niverusañ... Hep mont en tu all da greisteiz Lambrizig e verker : 1^{añ} *Severeg*, *Taelieg*, *Fereeg* ; 2^l *Avezeg*-*Mazereg* ; 3^t *Ranneg* ; 4^t *Felgerieg*-meur ; 5^t *Mezeg*-*Lozieg*-*Piverieg* (stignet e tric'horn ar re-mañ war div ribl ar Winun) ; 6^t *Kemblizieg* ; 7^t *Ruvenieg* - *Mizerieg* - *Ruvieg* ;

8^t *Malazeg - Paolieg - Glenneg*. N' am eus ket diskrivet meur a hini, ouzhpenn (1).

Diwallomp, eta, da liveañ an traoù evel ma rae La Borderie en e « Istor meur ». Mar deo Redon, da skouer, ur manati brezhonek savet e-touez pobladoù galian-romanek an IX^{vet} kd, n' eo ket ken stank ar Vrezhoned bodet er c'horn-bro-se hag ez int e Breizh-Izel, nag e darn hanternoz Breizh-Uhel.

Kreskadurezh ar *Plouiou*, al *Lanniou*, al *Logou*, al *Leziou*, an *Trevou* a oa heñvel ouzh ar c'hlazvez a wisk ar maezioù pa zeu an nevez-amzer.

Da grediñ eo, zoken, evel ma rae Meven Mordiern, ma voe argaset ar bobl romanek a vane c'hoazh e kornog an Arvorig da vare enbroerezh ar Vrezhoned.

An anvioù-lec'hioù en -Ac a gaver e Leon, Kerne, Treger ha (paotoc'h !) e Wened a ziskouez anat n' oa ket didud ar vro. Hogen, bez' e oa rouesoc'h eno ar C'halian-Romaned eget ne oant e reter hag e kreisteiz an Arvorig. Hag ar Vrezhoned stankoc'h egeto kerkent ha ma voent dilestret.



KLOZADUR

Un damskeud eus Istor Breizh

Dre studiañ an anvioù-parrezioù o teraouiñ gant *Plou-*, *Lann-*, *Lok-*, *Lez-*, *Trev-*, hon eus bet un aspadenn eus ar vro gounezet gant ar Vrezhoned er V^{vet}-V^{vet} kd ha da heul... Brezhonekaet eo bet muioc'h-mui gant anvioù-lec'hioù-all : anvioù-sent hep anv-doareañ (*Goven*, *Gwengalon*,

- (1) Evit hol lennerion n' o dije ket en o c'herz « Roll an Anvioù-Lec'hioù Breizh-Uhel », setu ar stummoù gallek : Malguénac, Neuillac, Silfiac, Loudéac... Brignac, Ménéac, Merdrignac... Méréac, Eréac, Rouillac, Sévignac... Sévérac, Théhillac, Fégréac, Avesac, Massérac, Renac, Le Grand-Fougeray (gwechall *Foulkeriac* ha *Felgeriacum*)... Messac, Lohéac, Pipriac, Comblessac,, Réminiac, Missiriac, Ruffiac, Malansac, Peillac, Glénac.

Gwiniaw) ; war o lerc'h anvioù doare nevez (*St Mewen, St Yuzeg*). Ouzhpenn doareoù-all : *Gwenvenez, Skaubrizh* (1).

Kavout a reer an anvioù-mañ ken e tachenn ar *Plouiou* hag al *Lanniou*, ken er vro brizh-romanek.

En *XIV^{vet}* kd, ez oa brezhonekaet an *Arvorig* e-lec'h ma oa dilestret ar *Vrezhoned* pe war-nes bezañ brezhonekaet. D'ar c'houlz-se eo ec'h aloubas hon hendadoù eskopti *Roazhon* ha darn hini *Naoned* dalc'het betek-hen gant ar *Franked*. E-pad ur c'hantved pe zaou e voe komzet ar brezhoneg betek harzoù *Breizh* a-vremañ gant an aotrounez hag o zud a vrezel... E-pad un amzer re verr, avat, ha gant re nebeut a dud evit levezonañ lec'hanvadurezh an harzoù. Rak c'hoarvezout a reas neuze ur gwalleur : ar *Vikinged*, laeron-vor put, o tont da annezñ en enezennoù aber al *Loer* hag oc'h argadiñ *Breizh* a-bezh. E-pad ugent vloaz, emgannoù kriz etre ar *Vrezhoned* hag an alouberien nevez. *Rouantelezh Breizh* diskaret. *Diberc'hennet* tud ar *Vro*, brezhonegerien ha romanegerien. En em unaniñ a rejont a-benn neuze a-enep paotred gouez an *Norz*. En diwezh e voe trec'h *Breizhiz*. Padal ne voe ket keltiekaet bro-*Roazhon* ha darn bro-*Naoned* skrapet gant *Nevenoe* hag *Erispoe*. Ouzhpenn-se e kilas ar brezhoneg adal ar mare-se e diabarzh ar vro.

Hep donedigezh *Skandinaviz* e vije deuet an *Arvorig* brezhonek a-bezh ha ne vije ket lonket dugelezh *Breizh* gant Bro-C'hall evel ma voe aes d'ar *Gapesianed* hen ober diwezhatoc'h. Setu pezh a skriv *Loth* e dibenn e dezenn-zoktorelezh « *L'Emigration bretonne* » hag un duez eo evidomp.

Kamp-bac'h Spinial 1949 - Naoned 1963.

(1) *Goven, (Vildi)-Guingalan, Le Vivier... Saint-Méen, Saint-Judoce... Guéméné (-Penfao), Saint-Viaud e galleg.*

NOTENNOU DIWAR LENNADURIOU

gant

Youenn OLIER

« **Trodairi an treas briogaide** » (Emgannerion an trede brigadenn) gant Colm O' Labhra.

Embannet gant « Clo di Mheara » e 1955.

KLASK a ra ar skrivagner el levr-mañ taolennañ oberiantiz an trede brigadenn eus lu-dieubiñ Iwerzhon adal an 21 a viz Genver 1919 betek diwezh ar brezel diabarzh e 1923. (E gwirionez pa soñjer e oad krog da zastum armoù adal 1914 hag e oa tarzhet an emsavadeg ken abred ha 1916 eo anat a-walc'h eo padet dispac'h Iwerzhon un nav bloaz bennak !)

Betek-hen n'eus ket bet klasket, a gav din, sevel un istor klok ha dre-vras eus an dispac'h-mañ. E-leizh a levrioù eñvorennoù pe testenioù hon eus avat hag an oberenn-mañ a zo unan eus ar re-se. Tennañ a ra ar skrid-mañ eta da zisplegañ an taolioù hag an emgannoù kaset da benn gant kadourion an trede brigadenn, hini *Tiobrad Arann* « Tipperary ». N'eo ket al levr-mañ kentañ hini gouestlet d'an destenn-se ha meur a levr a oa bet embannet endeo — eñvorskridoù peurgetket — o tezrevell labour ha kurioù an trede brigadenn : hini Domhnall O' Braoin « My fight for Irish Freedom » a zo anavezet mat peogwir eo bet troet e galleg evit tud an Emsav a-raok ar brezel, dindan an talbenn : « Mon combat pour l'Irlande ». Ul levr all diwar-benn ar memes testenn a c'hellan menegiñ, hini Deasum O' Riain : « Sean Treacy and the third Tipperary brigade ».

E fed ez eo danevellet en « Trodairi... » (tev a-walc'h, 346 pajenn ennañ ha skeudennaouet stank) darn eus avanturioù ha taolioù kaer Domhnall O' Braoin : da skouer, an argad a-enep d'an tren da zieubiñ prizonidi iwerzhonat ; an argad ivez a-enep da French, letanant Roue Bro-Saoz en Iwerzhon

— penaos ivez e voe darbet da zDomhnall O' Braoin bezañ paket gant ar soudarded saoz en un ti, h.a.

Evit lavarout ar wirionez n'eo ket al levr-mañ ur wir oberenn lennegel ; bez ez eo kentoc'h un doare levr dielloù. En diwezh, da skouer, e ro deomp an aozer roll kevrennoù ha bezenoù an trede brigadenn, gant anvioù o ofisourion. Resis eo a-hend-all kement a zispleg deomp. Diskuliañ a ra, lakaomp, e oa 3.146 den enrollet er vrigadenn e miz Gouere 1921, hogen ne oa nemet 350 diouto en em ganne a-zevri hag ingal ha 250 all a oa prizoniet gant ar Saozon. Ne oa, a-hend-all, nemet 312 fuzuilh brezel er vrigadenn da vare an arsav-brezel. Dirazo e kave Iwerzhoniz 5.000 soudard saoz armet mat (etre paotred an arme reizh, ar « Black and Tans » hag ar bolised — ar re ziwezhañ-mañ iwerzhoniz a ouenn alies, dreist-holl an archerion). A-hend-all, bez e oa dre vras 80.000 soudard saoz o terc'hel ar vro d'ar mare ma voe sinet an arsav-brezel.

Ar pezh a rae ar muiañ diouer da Iwerzhoniz e oa armoù, eveljust, ha rak-se e krogas ar brezel gant argadoù a-enep d'ar c'hreñvlec'hioù ha d'ar postoù dalc'het gant ar Saozon. Seurt emgannoù a veze kaset da benn diouzh an noz hepken. Kerkent ha deuet an deiz e teue ar soudarded iwerzhonat da vezañ sivilised dinoaz a rae war-dro o labour bemdez hag int dispac'herion « week-end » kentoc'h eget pep tra all. Ret eo lavarout e oa aesaet o c'hrogadoù gant an anaoudegezh o devoa eus an ardremezioù : ober a raent o mad eus digenvez o enebourion. Ar re-mañ n'o doa da skoulmañ darempred gant ar postoù tostañ nemet fuzeenoù ; ne ra ket anv ar skrivagner eus benveg skingomzerezh ebet. El lodenn gentañ eus al levr e taolenn ar skrivagner an holl argadoù-se. Echuiñ a ra gant danevell marv eus unan a ofisourion gadarnañ ar vrigadenn, an Treasac'h.

En eil lodenn adal an eizhvet pennad e tispleg Clom O' Labhra penaos e voe savet ar bagadoù-red. Bez e oa anezho kevrennoù soudarded « leun-amzer », a zileze penn-da-benn o micher hag oberiantiz kent evit en em ouestlañ penn-da-benn d'ar soudardelezh. Diazez ha dalc'h al lu iwerzhonat e teujont da vezañ eveljust. Tizhout a reas Iwerzhoniz sevel bezenoù seurt-se stank a-walc'h hogen ne c'helljont ket biskoazh kreskiñ kalz ment ar bagadoù-se : re a grog a roent neuze d' al lu saoz a oa armet kalz pounneroc'h egeto (kirri-hobregonet

h.a.). Dav e voe eta da Iwerzhoniz distreiñ buan a-walc'h d'ar c'hevrennoù bihan, helusk avat, aes da skignañ ha da guzhat.

Gouestlet eo an trede lodenn da stourmerezha gouzañvat Iwerzhoniz, dreist-holl hini an emsaverion kraouiet e-barzh tiez-bac'h ha kampoù-bac'h ar Saozon. Boaz e oa ar re-mañ d' ober dilez-boued ha d' en em naoniañ (a-wechoù betek ar marv evel maer Kork) evit goulenn gwirioù prizonidi vrezel. Seurt tra a skoe moarvat faltazi ar bobl iwerzhonat hag a oa bet fromet endeo gant emaberzh Padraig Mac Piarais hag e geneiled. Kontañ a ra ar skrivagner penaos e c'helled gwelout war ar straed, e-harz mogerioù un toull-bac'h m' edo prizonidi iwerzhonat oc'h en em naoniañ, merc'hed iwerzhonat penn-daoulinet hag o lavarout o chapeled evit ar re a oa o c'houzañv evit ar vro. Hevelep darvoudenn a ziskouez ez eo bet an dispac'h en Iwerzhon un degouezh hag en deus trefuet ar bobl betek en he donañ. Hag e gwirionez ne c'hell ket ur vro aet da rannvro bezañ saveteet anez ma ve eilpennet speredoù ar vroiz.

Notomp a-hend-all ne oa ket an holl brizonidi a-du gant ar stourmerezha gouzañvat-se. C'hoarvezet eo e vije bet rediet lod da ober dilez-boued gant o c'henbrizonidi. Ma oa bet divizet en diwezh e vije lezet pep hini da ober hervez e goustiañs.

Ur pennad hir a-walc'h en deus savet ar skrivagner diwar-benn ar brezel diabarzh, ar brezel mantrus etre breudeur ha na zleje ket bezañ c'hoarvezet morse. Lakaat a ra ar Saozon kiriet d' ar brezel-se. E gwirionez eo degouezhet, war a seblant un emgav damheñvel ouzh an hini a zo erru en Aljeria e 1962 : gwall intent etre breutaerion an arsav-brezel. Gwall intent etre tud e-giz an Coileanac'h en doa kemeret kalz perzh er breutadegoù ha tud e-giz De Valera a gave dezhañ e oa bet re laosk hemañ.

Ar wirionez eo e voe darbet d' ar brezel tarzhañ adarre etre Saozon hag Iwerzhoniz (ha keuziañ a ra ar skrivagner na vije ket c'hoarvezet an dra-se abalamour d' ar frouezh c'hwerv a zeuas diwar ar brezel diabarzh) hogen un dra a gemmas penn d' ar vazh neuze e voe an dilennadegoù a roas an tu-kreñv d' ar re a oa oc'h harpañ ar feur-emglev hag ar « stad-dieub ». Neuze e nac'has an Coileanac'h derc'hel d' an divizoù en devoa graet gant De Valera ha tonket e oa d' an emsav

broadel en em rannañ ha d' an div gevrenn anezhañ en em sevel an eil a-enep d' eben.

Chom a reas an trede brigadenn dre vras a-du gant ar « Republik » evel a-raok. Hogen en dro-mañ e oa disheñvel krenn an traoù : ne oa ket mui an dud a-du gant an dispac'h-erion ; koazhañ a reas kalz niver ar re en em ganne e renkoù an trede brigadenn. Dav e voe d' ar Republikaned eta dilezel kerkent ar c'hêrioù evit mont da repuiñ war ar maez. Hogen o eneberion, e-giz m' em eus merket, a oa harpet neuze gant ar poblañs ; pourvezioù brezel hag armoù pounner o devoe digant ar Saozon ; bez e c'helljont tuta soudarded nevez en o aez ; tonket e oa eta d' ar Republikaned bezañ trec'het en diwezh. A-raok en em zaskoriñ avat e kolljont er stourmadenn vantrus-se ar re wellañ eus o ofisourion hag eus o renerion. Darn en em c'houlenn perak he deus bet Iwerzhon kement a boan da adsevel : arabat klask e-lec'h-all un diskleriadur da gement-se.

Evidon-me e kredan e oa ar brezel diabarzh-se ur walenn hag ur follentez. Moarvat ne oa ket gonezet gant Iwerzhoniz kement a oa da c'honit, dreist-holl e oa lamet digant ar vro unan eus he rannvroioù pinvidikañ ha keltiekañ goude holl. Hogen ar pep retañ a oa bet tizhet : bez e c'helle ar vroadelezh dreistvevañ ; diwezhatoc'h he dije kavet tu da greskiñ ha d' en em astenn. A-hend-all e voe gonezet ar frankiz klok hep freuzh e 1948. Ha deiz pe zeiz e tistroy Bro-Uladh d' ar vamm-vro, kaer eo gouzout.

E diwezh al levr e ro an aozer munudoù diwar-benn izili ha kevrennoù ar vrigadenn, diwar-benn ar strolladoù a sikouras start an emsavadeg : Fianna Eireann, da skouer, pe « Cumann na mban » (« Kevredigezh ar merc'hed ») ; erfin barzhonegoù iwerzhonek savet da geñver an darvoudoù.

Moarvat n'eo ket al levr-mañ un oberenn lennegel hogen reiñ a ra kalz a vunudoù a-zivout ur marevezh pouezus en istor ur vro kar-nes d' hon hini ha rak-se e kav din e c'hellomp kavout ennañ meur a gentel. (*)

(*) Daoust m'eo bet pouezus e brezel Iwerzhon intrudu hiniennoù zo e ve arabat krediñ ez eo bet kaset da benn gant amatourion evel un devert-amzer. Ouzhpenn ma oa kozh a-walc'h dija hengoun an dispac'h er vro e oad krog adal 1910 da soñjal a-zevri ennañ.

MEVEN MORDIERN GWELET

GANT SKOLIDI SADED ⁽¹⁾

AR c'hentañ poelladenn Lennegezh bet goulennet digant skolidi SADED a voe war vMeven Mordiern. Gant aotre Poellgor-Leviañ ar Strollad, gant aotre ar skoliad, ez embannomp amañ unan eus ar gwellañ poelladennoù, — dizanv hervez ar Reoliadur.

TESTENN. — En ur gemer skouer war raktres ar gentel emaoch o paouez studiañ, displegit talvoudegezh ar pennad da heul e-keñver yezh ha mennozioù :

SKETLA SEGOBRANI, Kevrenn gentañ, p. 38.

Bugaleerezh Manos ha Bena.

« Diwar-benn bugaleerezh Manos ha Bena, — pe
« Eburos ha Derva, evel m'o anver ivez diouzh an div
« wezenn a waskedas o ganedigezh, — ne livirin nemet
« nemeur a dra, daoust ma'z eo kement-se, a gredfen, en
« ur stumm, ar pep hoalusañ eus hon hengounioù. Buhez
« daou vugel o kreskiñ e pep dishualded e voe o hini, ouzh
« o flourañ bemdez aer c'hlan ar gouelec'h, e-kreiz ar
« c'hoadoù bras, an doureier diroll hag ar rec'hell, hep ken
« darempredadur nemet o mamm, al loened pevar-zroadek,
« an evned hag an amprevaned. Adaqi merc'h ouizie
« ar gwezegoù, he doa o c'helennet war gement a ouie
« hec'h-unan. N'oa gwezenn, bodenn, geotenn, kinvienn
« ebet o tiwanañ war zremm dorosellek an douar, kailhenn

(1) Pep diskleriadur diwar-benn Strollad an Deskadurezh Eil Derezh (SADED) a vez goulennet digant : P. CALVEZ, Bréhec *Plouha* (Côtes-du-Nord).

« ebet o ruilhañ war e c'horre pe o c'hourvez en e
 « gondonioù, na ouvezje Manos ha Bena an anv hag ar
 « perzhioù anezho. Evn ebet o nijal en oabl, pesk o
 « neuñvial en dour, loen o kerzhout pe o torc'hweniañ war
 « donenn c'hlas Andelitana, na anavezjent o anv, o
 « doareoù, o buhezegezh ! Diouzh an avel, neuz ha red ar
 « c'houmoul, stuz an neñv noz ha beure, liv an heol ha
 « doare al loar, e ouient diouganiñ an amzer. Anvioù ar
 « stered a anavezent, ar re zigeneil pe ar re emstrolladet
 « a luc'h a-hed an noz en oabl, kerkoulz hag anvioù ha
 « buhezioù an doueed a ra eno o annez. Dindan eñvor ha
 « dre ar munodoù e ouient nesañded ha kurioù ar ramzed,
 « an anvioù anezho hag al lec'hioù m' o c'haver, pe war
 « c'horre pe e kondonioù an douar, pe war harzoù ar bed.
 « Diskuliet he doa Adaqi dezho gwir-zoare ar bed,
 « kevrennadur an douaroù hag ar morioù war e c'horre,
 « neuziadur an douaroù-bras hag an enezennoù ; desket
 « he doa dezho dezrevelladur ganedigezh ar bed hag an
 « darvoudoù tonket dezhañ.

« Eus an holl ouiziegezh-se ne denne Manos ha Bena
 « lorc'h ebet, dre na welent war o zro den a gement a vije
 « bet da dezhañ o c'hammveuliñ hag o c'has da fall. Ha,
 « diouzh he zu, Adaqi, ar ramzez fur, o mamm, he doa
 « diwallet da enaouiñ dre gomzoù dievezh an emc'hloar
 « en o c'halon. »

DIGORADUR. — Ar wech kentañ ma lenner arroudenn
 ar « Sketla Segobrani » diwar-benn « Bugaleerezh Manos ha
 Bena » e chomer un tammig bamet gant lufr ar gerioù yac'h,
 resis, eeun, a weler o skediñ a-hed ar pennad. Buan-tre en em
 c'houlenner koulskoude daoust ha par eo talvoudegezh ar
 yezh da binvidigezh ar geriadur. O prederiañ un tammig
 ouzhpenn e teuer nec'hetoc'h c'hoazh, ha goulenn a reer ivez
 daoust hag-eñ e klot nerzh diabarzh ar mennozioù gant an
 dremm genedus diskouezet a-ziavaez. A-bouez eo hen gouzout,
 rak netra kasausoc'h eget an touell, dreist-holl evit ul lenn-
 egezh a lavar bezañ lennegezh un emsav broadel : kentoc'h
 eget helavarded goullo e vije gwelloc'h kaout mennozioù yac'h
 ha don, diouzh ret dindan ur gwiskamant rustoc'h ha dilufr.

AR YEZH. — Al lennadenn gentañ eus « Bugaleerezh
 Manos ha Bena » hol laka trumm en un aergelc'h dic'hortoz
 ha nevez d'ar vrezhonegerion e derou ar c'hantved-mañ. Ur
 roll berr eus ar gerioù pennañ a ziskouezo pegen pinvidik,
 glan, keltiek, arnevez eo ar gerioù implijet :

bugaleerezh, ganidigezh, buhezegezh, darempredadur, kevrennadur, neuziadur, dezrevelladur, dishualded, nesanded, hengounioù, gwezeoù, darvoudoù, digeneil, emstrolladet, pevarzroadek, gouelec'h, gouiziegezh, emc'hloar, torc'hweniañ, diouganiñ, kammveuliñ, dremm dorosellek an douar...

Ar gerioù-se eo a ro an doare glanyezhel d'ar pennad. Pellaat a reomp diouzh bouilhenn ar « brezhoneg pobl », a zo ur brezhoneg bugale dizesk. Ar yezh kozh, yezh hon tadoù-kozh hag hor mammoù-kozh kabac'h (gant azaouez d'o c'hozhni, peogwir int bet yaouank ivez) a gemer raktal neuz ar baotred balc'h hag ar merc'hed koant a weler o tifoupañ dre-holl pa zeu an nevez-amzer. Pell emaoimp ivez amañ diouzh ar brezhoneg gallekaet, arouez ar bobl aloubet gant an estren. Ar geriadur-mañ a eilger d'ar striv-dieubiñ sevenet war un dachenn all gant paotred taer an amzer-se, paotred Breizh Dishual da gentañ, ha paotred Breizh Atav goude.

Hogen, n'eo ket ar geriadur e-unan a zo gwellaet, met ivez an troioù-lavar, an ereadurezh, gwevn ha nerzhed evel ma tere ouzh ar yaouankiz.

— « Ne livirin nemet nemeur a dra... »

— « An div wezenn a waskedas o ganedigezh... »

— « Hep ken darempredadur nemet... »

Berrder al lavarennoù a laka anat c'hoazh hon eus da ober gant skrivagnerion a ya eeun d'ar pal, dre an hent berrañ, hep koll o amzer gant arabeskennoù kildroennek al lennegezh-rannvroel. Selaouit kentoc'h :

« Evn ebet o nijal en oabl,
pesk o neuñvial an dour,
loen o kerzhout... »

peadra da lakaat an holl Varzhed, Ovated ha Drouized ar bedoù kelt da embann ur c'harnadeg-veur war skouer ar « Gorsedd digor » a zeuio diwezhatoc'h.

Ret eo c'hoazh notañ pegen aes e teu ar skrivagnerion a-benn d'en em zibab er frazennoù hir a ro tro dezho da fetisaat ha da beurzisplegañ o soñj en un doare ken naturel :

« Eus an holl ouiziegezh-se ne denne Manos ha Bena lorc'h ebet, dre na welent war o zro *den a gement* a vije bet da dezhañ o c'hammveuliñ hag o c'has da fall. »

Oc'h arvestiñ ouzh ar pennad e weler eta eo kaer an neuz a-ziavaez, sart, gwevn, plijus, saourus d'ur brezhoneger a-vihanik n'en deus ket kollet ijin ar yezh. En ur ger, un

dremm yac'h en deus ar pennad. Gwelomp bremañ avat petra dalvez ar galonenn.

AR MENNOZIOU. — Mar klaskomp bremañ studiañ mennozioù ar pennad e kejomp gant ur vojenn o tont eus penn-pellañ hengoun Mab-Den : ar gredenn en evurusted douarel e penn-kentañ ar bed, en diavaez eus ar gevredigezh vodern ; ar gredenn e talvoudegezh an Natur, an aer yac'h, an darempred gant al loened, ar plant, evit reiñ d'ar spered tu d'en em ziorren.

Ar mennozioù-se, ankounac'haet ur pennad amzer er Gornog da heul levezon drastus Yanseniuz hag e ziskibion, a zo bet degaset war-c'horre dindan levezon ar Broioù Keltiek, gant Shelley e Breizh-Veur, gant Jean-Jacques Rousseau e Bro-C'hall. Dizoloadennoù broioù nevez, abaoe ar 16^{vet} kantved o deus pouezet kalz ivez. An dizoloerion-vroioù eo bet levezonet o doareoù-soñjal gant ar broioù hag an dud dizoloet evel-just, hogen ivez gant an treuzkredennoù a oa c'hoazh o redek dre Europa, hag a asure, da heul Imrammoù Iverzoniz pe Beajoù Burzhudus Sant Brandan, e oa c'hoazh ur baradoz an Douar, un Tir na n-òg a evurusted war an douar-mañ, pell du-hont er C'huzh-Heol.

Ar mennozioù displeget er pennad-mañ a oa boutin a-walc'h eta en 19^{vet} kantved. Meven Mordiern koulskoude en deus klasket reiñ d'e vojennoù un neuz skiantel : paramant levr-lennadurel, gerioù nevez hag all... Kement-se evit sankañ er speredoù gwirionded ar mennozioù displeget.

Rak ar mennozioù endalc'het e « *Bugaleerezh Manos ha Bena* » n'int ket hepken testenioù eus un amzer : talvoudegezh wirion o deus, daoust ma ne sevenont ket holl c'hoantegezhioù an den.

a) Ar gredenn e Baradoz an Douar a zo ken kozh ha koun an den. E-touez Sumeriz da skouer e kaver ar vojenn. En em zispleget eo ar vojenn e danevelloù kaer-meurbet o deus talvezet da isframm lennegel da skrivagnerion ar Bibl (Geneliezh, I ha II). Pennadoù kentañ ar Bibl avat a zo disheñvel-bras koulskoude dre o endalc'had. Padet he deus ar vojenn a-hed kantvedoù, hag hec'h adkavout a reer e stumm pe stumm e-touez hogos an holl bobloù.

b) Ouzhpenn ar galv d'an evurusted douarel, e kaver c'hoazh e « *Bugaleerezh Manos ha Bena* » ar garm a-enep ar

gevredigezh kelt gwirion a gaver e Breizh, hag a zo brein er mare-mañ. Meven Mordiern a oa bet ken hoalet gant ar Gelted en e vugaleaj, en doa bet ur gwall zistokadenn p' en doa kejet gant o gourvibion. Peogwir n' eus ken kevredigezh kelt ebet e Breizh, eo dav lavarout eo brein Ar Gevredigezh, ha huñvreal un doare-bevañ all a vo yac'h, da lavarout eo a vo kelt penn-da-benn, dreist-holl dre ar yezh.

k) Evit adsevel an doare-bevañ yac'h-se eo ret strivañ, ha pennad Meven Mordiern a zo ur skrid meur savet evit heñchañ ar Vretoned yaouank etrezek soñjoù nevez, soñjoù dic'hall, soñjoù a lorc'h broadel, soñjoù a lorc'h gouennel, ret evit reiñ d' an dud sklavelaet azaouez evito o-unan da gentañ.

Kejañ a reomp neuze gant ar gwanderioù a zo er pennad, evel e pep mojenn. Seblantout a ra Meven Mordiern argas ar Gevredigezh, pep Kevredigezh. Hogen, n' eo ket ar Gevredigezh dre vras a zo fall, met an hini c'hall ma vevomp enni. Ur gevredigezh vreizhat, pa vo adsavet, a c'hello bezañ yac'h evidomp. Ur fazi e vefe stagañ hor strivoù ouzh mennozioù enepkevredigezhel, peogwir eo dres ur gevredigezh hon eus da grouiñ. Re eo miret ar brezhoneg da skouer evit ar vuhez prevez, ar vuhez hiniennel, ha stanket eo dirazañ pep stern kevredigezhel.

KLOZADUR. — Evit barn berr ar pennad « *Bugaleerezh Manos ha Bena* », e c'hellomp lavarout ec'h eilger d' ar binvidigezh a-ziavaez un nerzh a-ziabarzh a ra d' an arroudenn bezañ ur pennad a wir lennegezh, hag an oberenn hec'h-unan, ar Sketla Segobrani, bezañ un oberenn veur, barrek da zedennañ ar speredoù ar gwellañ.

Ar frankiz a fell dezhi bezañ gonezet, morse ne vez roet a galon vat.

LAMENNAIS.

Petra a ginnig deoc'h S. A. D. E. D. ?

STROLLAD AN DESKADUREZH EIL DEREZ a zo e bal aozañ e Breizh un deskadurezh kevatal d'an hini a vez roet d'ar yaouankiz e kement bro sevenaet a zo.

Petra eo S. A. D. E. D. ?

Mar fell deoc'h ober e brezhoneg ar studioù a rafec'h e-barzh forzh petore kelenndi Europa, lakait hoc'h anv war roll ar skolidi evit unan pe meur a zanvez hervez an amzer a c'hellit dioueriñ.

Mar fell deoc'h gwelout an Deskadurezh Eil Derez brezhonek o kreskiñ hag o kemer ar plas a zo dleet dezhi, lakait hoc'h anv war roll an izili-harpañ.

Mar hoc'h eus graet labourioù o tennañ d'an Deskadurezh Eil Derez, e c'hellit dont da vezañ kelenner.

Penaos mont e Strollad an Deskadurezh Eil Derez ?

Kentañ tra hoc'h eus d'ober eo en em lakaat e darempred gant ar C'hreizenner (1), o venegiñ dezhañ ar perzh a ginnig da gemer en obererezh ar Strollad.

Kaset e vo deoc'h gantañ kement diskleriadur hoc'h eus ezhomm.

(1) *Ar C'hreizenner* : M. P. CALVEZ, Bréhec, PLOUHA (C.-du-N.).

NOTENNOU

HOR MIGNONED

Mariannick BERON ha Jean-Pierre DUVAL a zo laouen o kemenn deoc'h ez int bet euredet e Roazhon, d' ar meurzh 6 a viz Eost.

Inga ha Yann-Erwan AR GWILHOU a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Karin-Maria-Elen, d' ar 16 a viz Eost, e Pariz.

Padrig, Gwenola ha Perig JEUSSET a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o breur Yannig, d' ar 17 a viz Eost, e Roazhon.

Yann ha Monika KERGRENN, o merc'h Gwenola, Anna ha Mona o deus ar blijadur da gemenn ganedigezh Rozenn, d' an 12 a viz Eost.

An Itron hag an Ao. L. BIHANNIC a zo laouen o gemenn deoc'h ganedigezh o mab Ronan, e Lannilis, d' ar 25 a viz Mezheven.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

PROFOU

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-korf an daou viz diwezhañ :

MEZHEVEN : A. Lideg, 5 lur ; Gab Mahe, 10 ; Y. J. Kerdiles, 2 ; F. Nedeleg, devezh ar brezhoneg, 25 ; R. Gwiomar, 5 ; Herri al Lann, 5. — **War un dro**, 52 lur.

GOUHERE : H. Le Bitoux, devezh ar brezhoneg, 20 lur ; Andreu Daniel, 35 ; Yann er Meliner, 5 ; Dll M.-J. Marot, 10 ; It. Vefa a Sant-Per, 85 ; Dll Anna ar Floc'h, 5 ; J. Habask, 15 ; Jos Korbel, 5 ; Dll Gwenola Albaret, 5 ; Roje Brisson, 25 ; Per Penneg, 40 ; E. Prad, 3 ; R. Tassel, 80. — **War un dro**, 333 lur.

Degemeret hon eus abaoe derou ar bloaz 1.057 lur a brofoù. Bennozh Doue d' an holl brofourien, a wir galon.

487 KOUMANANTER

E derou miz Gouhere e kontemp 487 koumananter, rannet evel-hen : Aodoù an Hanternoz, 78 ; Penn ar Bed, 91 ; Il ha Gwinum, 53 ; Lijer Atlantel, 18 ; Mor Bihan, 42 ; Pariz ha tro-war-droioù, 105 ; departamantoù all, 52 ; Kembre, 9 ; Iwerzhon, 10 ; Skos, 2 ; Bro-Saoz, 2 ; Bro-Alamagn, 6 ; Izel-Vroioù, 2 ; Bro-Helvetia, 1 ; Monako, 1 ; Afrika an Hanternoz, 4 ; Afrika Du, 1 ; Kanada 7 ; Stadoù-Unanet, 2 ; Arc'hentina, 1.

Hor seizh gwellañ a raimp evit tizhout dizale ar sifrenn a 500, sikourit ac'hanomp diouzh ho tu ha klaskit an 13 koumananter a ra diouer. Brav e vije tizhout an niver-se gant hor 100^{vet} niverenn. Bec'h dezhi !

SKRIVAN A REER DEOMP

« Va anv-badez a zo « Youenn » hervez al lezenn amañ. Lakaet em eus kemmñ va anv eus « Yves » da « Youenn » pa 'z on deuet da vezañ keodedad Amerikan. Nac'het 'oa bet a gwir-se d'am zad gant al lezenn c'hall e Maerdi Skaer 38 bloaz 'zo, met n'int ket ken hizidik-all dre amañ a-zivout anvioù. »

Y. G. (U.S.A.)

« Tri miz 'zo emañ o klask an tu da skrivañ deoc'h ur ger evit lavarout deoc'h pegen evurus on bet, hag ez on bepred, o lenn an holl draoù plijus ha talvoudus a gaver a-builh el **Liamm**. »

Nec'het e vefen avat o lavarout petra a blij din ar muiañ. Graet am eus evel ar saout aet da laerez : galoupat a-dreuz hag a-hed n'ur beuriñ tamm amañ, tamm ahont o klask pe lec'h eo ar gwellañ.

Me gred 'eo gant « Veig Trebern » 'm eus bet ar brasañ plijadur ha « Bisousig », pezhioù-c'hoari Jarl Priel ha Roparz Hemon. Kontadennoù Reun Menez Keldreg a zo dispar. Hag an holl varzhonegoù a zo dedennus ha lod kaer-spontus. Kiet am eus war varzhonegoù Kerverziou, daoust ma 'z int pagan int plijet dreist din. Skrivagnerion vat 'zo o sevel deoc'h e-touez ar re yaouank d'am meno : Garmenig Ihuelloù, Gwenole ar Menn, Yann-Ber Biriou hag all.

Keuz am eus avat da Abeozen : unan eus ar re wellañ oa ha labourer kalz en deus evit Breizh a-hed e amzer, Doue d'e bardono. »

A. D.

CHOMLEC'H KEMMET

E-touesk beleien c'houmanantet d' **Al Liamm** ez eus bet kemmoù dic'hortoz a-walc'h.

An Ao. Kalvez, rener Skol Sant Erwan e Ploueg ar Mor, a gemenn deomp ez eo bet anvet da aluzener e Crec'h-Avel (Lanuon). Evit ar c'helaouennoù *Skol* ha *Wanig* ez eo kemmet ar chomlec'h ivez eta. An Ao. Kerain, kure e Gwengamp, a zo bet kaset da evezhier e Kloerdi Bihan Kintin.

Klevet hon eus a-hend-all ez ae kuit hor mignon an Ao. Troal d' ar Perou !

170 DEN E 16^{vet} KAMP AR VREZHONEGERION

C'hwezekvet Kamp ar Vrezhonegerien — Skol ar Studioù Uhel a zo bet dalc'het e Langoned azalek an 29 a viz Gouere betek ar

14 a viz Eost. Padet en deus eta 17 devezh. Biskoazh n' eus bet gwelet kement a Vrezhonegerien o tremen hag o chom en ur c'hamp. Bep bloaz e kresk niver an dud peogwir e oa 123 den warlene e Sant-Nikolaz, ha dav e vo moarvat rannañ ar c'hamp er bloavezhioù a zeu. Renet e oa ar Skol-Hañv-se evel boaz gant Ronan Huon, Vefa de Bellaing o vezañ sekretourez ha Pol Kalvez teñzorer.

Ar C'hamp a oa teir lodenn ennañ hevlene : ar vugale, an deskarded hag ar Skol Uhel. War un dro eta ez eus bet 170 den, dreist-holl dindan 30 vloaz : 66 paotr, 49 plac'h ha 55 bugel dindan 15 vloaz. Niver well-wazh an dud chomet e-pad ar 17 devezh a zo 70,5, tra ma oa 48,5 warlene, e Sant-Nikolaz, ha 11,7 e Logivi.

Ar c'hentelioù a zo bet graet gant : R. ar Glew, Abanna, Ronan Huon, Per Denez, an Ao. Bourdelles, an Ao. Dubourg, ha Pol Kalvez. Morwena Denez, Gizella Etienne, Garmenig Ihuellou, A. al Louarn hag Erwan ar Menn o deus graet dreist-holl war-dro ar vugale. En div skol izel evit an dud vras e veze studiet ar yezh. Er skol uhel, dindan anv Saded, ez eus bet kentelioù war al lennegezh (Mordiern, M. Glanndour, R. Hemon, T. Malmanche), ar yezh (Termenadurezh, ar stummoù e -fe hag e -je, urzhiadur ar gerioù er frazenn, ar verb war-lerc'h « mar »), fizik ha douaroniezh.

Pevarzek prezegenn a zo bet, sed amañ ar roll anezhe :

SADED gant ABANNA.

Va micher tisavour gant Per LEMOINE.

Kudenn ar skoliata e brezhoneg er gêr gant ABANNA.

Korn Bro Langoned gant an Itron IHUELLOU.

An UFCE gant Per LEMOINE.

Ar Stourm evit ar yezh en Iwerzhon gant Youenn OLIER.

Iwerzhon, ar vro hag an dud gant R. DELAPORTE.

Ar Gelennadurezh er C'hanada gant Herve KONAN.

Kudennoù ar yezh gant ABANNA.

An Alkool gant an D^r ROPARZ.

Talvoudegezh ar gwerzhioù gant Maodez GLANNDOUR.

An ijinerezh e Breizh gant Yann er MELINER.

Maodez Glanndour, barzh, gant G. DUBOURG.

Seitek den o deus tremenet an Trec'h Kentañ hag unan an Trec'h Meur.

An holl gentelioù eveljust a zo bet graet e yezh ar vro.

N' eo ket bet ankounac'haet an diduamantoù : beilhadegoù, dañs, c'hoariva (*Kleñved an Togn, Gorsedd digor, Torfed ar Frer Juniper*), sinema, gweladenn da gelañ keltiek an Abati, baleadennoù er vro, c'hoari volley ha mell troad. P. Y. Moign en deus graet en un doare ampart war-dro al laz-kanañ.

Eus ar broioù keltiek e oa deut daou zen : an Ao. Kavannagh, kelenner e Skol-Veur Cork, hag ur studier eus Bro-Gembre. Bez e oa ivez ur plac'h yaouank eus Katalonia.

ARNODENNOU E KAMP LANGONED ———

Arnodennoù an Trec'h Kentañ hag an Trec'h Meur a zo bet tremenet e Langoned, d' an 10 a viz Eost 1963.

A zo bet kavet barrek da c'hounit :

Trec'h Kentañ

An Itron Gizella STEVEN gant ar meneg Mat-tre ha meuleudi ar varnerien ; Erwan LEON gant ar meneg Mat-tre ; Anna DELAPORTE gant ar meneg Mat-tre ; Erwan KERVELLA gant ar meneg Mat ; Ronan TREMEL gant ar meneg Mat ; Bernard AUDIC gant ar meneg Mat ; Mari-Annaig OLIER gant ar meneg Mat ; Gwendal DENEZ gant ar meneg Mat ; Annaig DOUSSIN gant ar meneg Mat ; Morwena DENEZ gant ar meneg Mat ; Mari-Tereza AR C'HAMM gant ar meneg Mat ; Malo LOUARN gant ar meneg Mat a-walc'h ; Yann-Gamilh HANUS gant ar meneg Mat a-walc'h ; Rivanon KERVELLA gant ar meneg Mat a-walc'h ; an Itron KALVEZ gant ar meneg Mat a-walc'h ; Mari-J. ROUSSEL gant ar meneg Mat a-walc'h ; an Itron ROPARS ; Yann-Erwan BIZIEN.

Trec'h Meur

Gwion AR MENTEG gant ar meneg Mat-tre ha meuleudi ar varnerien.

KELAOUENNOU

War niverenn 20 **AR VRO** e c'hellomp lenn ur pennad dedennus ha buhezek gant Goulc'hen Pennaod, « E koun Abeozen ». Kontañ a ra penaos en em gavas evit ar wech kentañ gant ar skrivagner, en un toull-bac'h.

Div levrenn eus **PREDER** a zo deut er-maez nevez 'zo, an niverenn 41-42 a gaver enni danevellskridoù ar C'hendalc'h Keltiek. Ul levrenn gaer 168 pajenn enni eo, diskouezet ha roneoskrivet kaer. Ar pennadoù a zo e brezhoneg hag e saozneg (12 lur). Al levrenn 43-33 a zo anezhi seizhvet kaier ar « Geriadur Istorel » (betek ar ger *Espediant*) [7,50 lur].

Niverenn 32 **AN TRIBANN**, kelaouenn ar Gorsedd, a zo moulet ha diskouezet kaer bremañ. Ar pennadoù ez eus danvez a-bouez enno.

BARR-HEOL a zalc'h gant hec'h erv. Ur blijadur e vez evidomp lenn brezhoneg Klerg hag e varnadennoù diardoù !

Levr *Buhez ar Sent* gant an Ao. PERROT a chom da werzhañ gant an Ao. Thomas, 12, rue Sainte-Catherine, Kemper ; 18,00 lur eo ar priz gant ar mizoù kas.

« AR EN DEULIN » adembannet gant « Edition Kendalc'h »

Un nebeut barzhed breizhat a zo deut da vezañ brudet dre m'eo bet embannet o oberennoù e galleg ha Kalloc'h a zo unan anezhe. Re all, evel Roparz Hemon ha Maodez Glanndour, brasoc'h e meur geñver, a chomo dianav zoken da galz a dud eus an Emsav ha dreist-holl d'ar gelaouennerien.

Kalloc'h avat a zo o paouez bezañ embannet evit an trede gwech e galleg hag e brezhoneg war un dro.

An tamall a rin d'an embannadur-se eo n'eo ket bet graet gant ur spered breizhat, savet eo bet evit gallegerien dreist-holl. Niver al levrioù tennet a zo roet e galleg hepken hag ivez an holl rak-skridoù dizanv da heul ha zoken an drugarez da Yves Mocaer ha Loeiza er Meliner deut da vezañ e galleg Mme Loeiz Herrien (n'heller ket tamall re ar vi-koukoug d'an embanner).

Al levr e-unan a zo diskouezet kaer, ur golo kalet griz-glas dezhañ. Ar moulañ a zo aketus ha naet ha brav ar paper, c'hwec'h skeudenn a zo da heul, ar skreved, ar brinik hag ar gouloù koar a blij din dreist-holl.

Ar skrid brezhonek a zo bet kempennet mui pe vui ha reizhet, seblantout a ra ez eus bet klasket a-wechoù tostaat ouzh ar fahuneg.

Tu a zo da geñveriañ ar pezh kentañ gant testenn Dihunamb hag a oa dija reishoc'h eget hini Plon. War an destenn nevez-mañ e kaver : **Anù e-lec'h Hanù, 'n em deurel e-lec'h um dorel, arré evit aré, sona evit soñna, e vond evit e vont** (evit tostaat moarvat ouzh ar fahuneg rak war destenn 1921 ha 1935 e oa skrivet **vont**, pelloc'h e kaver ivez **eid e-lec'h eit**) **en-des evit hen dës, dohtoñ evit dohton**, ho kalon evit hou kalon, bedenn e-lec'h beden. Dre vras e kredomp ez eo bet reizhet ar skrid en un doare dereat, evit « mont » « eit », h.a., e vefe bet gwell mirout doare-skrivañ Kalloc'h.

Al levr a zo e gwerzh e ti « Breizh », B.P. 78, La Baule. Priz : 16,50 ha 1,50 mizoù kas. K. R. P. 144 67 Roazhon.

BUHEZ AR BREZHONEG E ROAZHON —

Meur a hini a gav dezhañ moarvat n'eus lod ebet gant ar brezhoneg e buhez Roazhoniz. Ha gwir eo e ranker kaout skouarn tanav ha daoulagad lemm da ziskoachañ bommoù brezhonek komzet pe skrivet e kêrbenn Breizh. Koulskoude ez eus brezhonegerien e Roazhon, ouzhpenn 10.000 moarvat. Ha kreskiñ a ra o niver gant an dud o tont diouzh kornog ar vro da glask fred e ti Citroën pe el labouradegoù all. Gwir eo ez eo ar brezhoneg ganto evel un dra kuzh ha komzet e chuchumuchu pell diouzh an dud dianav.

Tud all, re nebeut anezho, a glask er c'hontrol digeriñ d'hor yezh ur plas a-wel d'an holl e kêrbenn Breizh.

Bez ez eus Kelc'h Sevenadurel Brezhonek Roazhon a ginnig da neb a gar bodadennoù sizhuniek, diskouezadegoù levrioù, emvodoù miziek evit ar vugale, kentelioù da zeskiñ hor yezh, levrioù da amprestañ.

Ar J.E.B. ivez en deus savet ur rumm kentelioù war ar brezhoneg evit ar studieren hag aozet kaozeadennoù diwar-benn hor yezh hag hol lennegezh.

Hag evit an daoulagad ? Enskrivadurioù brezhonek war dalbenn peder stal, war re ar C'helc'h Keltiek, ar C'helc'h Breton, ar Gevrenn. Levrioù brezhonek e peder stal da vihanañ. Traktoù ha skritelloù brezhonek pe zivyezhek da geñver Devezh ar Brezhoneg, beilhadegoù ar C'helc'h Sevenadurel, Pardon Sant Erwan, Oferenn ar Vrezhonegerien ha re all niverus a drugarez da « Brudañ ha skignañ ».

War dachenn ar vuhez relijiel ez eus abaoe pell amzer oferenn

ar Pellgent aozet gant kevrenn Roazhon gant kantikoù hag an aviel en hor yezh. Oferennoù evit ar vrezhonegerien a oa ivez a vare da vare er bloavezhioù tremenet. Abaoe bloaz hanter e tastum oferenn ar vrezhonegerien 120 den bennak bep sul diwezhañ eus ar miz e chapel leanezed Santez Klara. Da geñver gouel Sant Erwan ez eus bet savet ur pardon hevlene gant parrez yaouank Sant-Erwan. E brezhoneg e oa al lodenn vrasañ eus ar sarmon hag eus ar c'hantikou. Leun-barr e oa an iliz : ouzhpenn daou vil den moarvat. Nebeut a dra eo kement-se a dra sur e keñver nerzh ar galleg maget gant ar skingomz, ar skinwel, ar skolioù, ar c'helaouennoù bras. Hogen un tamm spi ez eus hag un tamm nerzh hag a c'hello kreskiñ gant ma talc'ho pennek brezhonegerien Roazhon gant o stourm da zigeriñ frank lec'h ar yezh e kêrbenn ar Vro.

KELC'H SEVENADUREL ROAZHON

Kendalc'het en deus Kelc'h Sevenadurel Roazhon da vevañ ha da labourat e-pad ar bloavezh-skol a zo o paouez echuiñ. Ha chomet eo feal d' e bennsturienn : implij ar brezhoneg hepken, nemet evit ar c'hentelioù hag a-wechoù ar bruderezh.

Un taol-chañs e penn kentañ ar bloaz : kavet en deus ar C'helc'h Sevenadurel ul lojeiz dezhañ e-kreiz kêr, hag ul lojeiz brav. Diwar-se ez eo bet al labour aesoc'h eget warlene.

Setu amañ da heul ar pezh a zo bet kaset da benn dre vras :

— ur vodadenn bep sadorn da noz (24 ezel o deus paeet o skodenn). Eno e vez peurliesañ kan ha c'hoarioù a bep seurt hogen ivez pemp kaozeadenn, unan anezho gant luc'hskeudennoù bannet ;

— skol vrezhonek bep sadorn ha bep lun (daou rumm kentelioù bewech gant ugent den bennak e pep hini) ;

— ur veilhadeg gant pezhioù-c'hoari berr, kanaouennoù ha filmoù (ur 100 den bennak o kemer perzh) ;

— un diskouezadeg levrioù ha kelaouennoù e 75 stal e kêr, unan ivez e sal vras ar C'helc'h ;

— un emvod bugale bep sul diwezhañ eus ar miz (29 en holl, etre etre 12 ha 19 bep gwech), a-wechoù e salioù ar C'helc'h pa veze rust an amzer, gwechoù all war ar maez ;

— gwerzh levrioù er C'helc'h hag er-maez.

E miz Here e krogo ar C'helc'h da vont en-dro adarre. Petra a vo sevenet gantañ er bloavezh a zeu ? Mar deo merket strizh peseurt yezh a rank bezañ implijet er C'helc'h, n' eus reolenn groñs ebet o verkañ war beseurt danvez e vo pleustret. Digor eo ar C'helc'h d' an holl vrezhonegerien ha d' ar re o deus c'hoant deskiñ brezhoneg, a bep oad, a bep vicher, a bep soñj. Eurüs e vefe ar C'helc'h da skoulmañ darempredoù gant ar c'hevredigezhioù all a ra gant ar brezhoneg. Ar re a fell dezho gouzout hiroc'h a c'hell skrivañ da « Kelc'h Sevenadurel Brezhonek Roazhon », 30, Place des Lices, Roazhon.

AR BREZHONEG ER VACHELOURIEZH —

Evel ma ouzer ar brezhoneg ne servije nemet da gaout ur meneg er vachelouriezh. Evel ma n' eus mui meneg ebet el lodenn gentañ ne servij bremañ nemet evit an eil lodenn.

Setu amañ, hervez ar gelaouenn « Le Monde », niver an arnodennidi o deus tremenet arnodennoù peuzdidalvoud ar yezhoù rannvroel : Akademiezh Pariz (1962) : war un dro 37 : 12 evit ar C'hatalaneg, 10 evit ar Brezhoneg ; 10 evit an Okitaneg, 5 evit an Euskareg. Akademiezh Toloza (1963) : 20 evit an Okitaneg ha 10 evit ar C'hatalaneg. Akademiezh Montpellier (1962) : 300 arnodennad evit an Okitaneg. Akademiezh Roazhon, brezhoneg : 66 arnodennad e 1952, 109 e 1955, 150 e 1960, 91 e 1963.

PERAK NE C'HELLER KET KELENN BREZH- ONEG ER SKOLIOU ?

Bez' ez eus roll-labour ha roll-labour na petra 'ta !

Ministr an Deskadurezh e Bro-C'hall en doa respontet e-kerz miz Mae 1963 d'an Aotrou Orvoen, kannad Penn-ar-Bed : « Ne c'helle ket lakaat ar brezhoneg war ar roll-labour dre ma vefe ret kreskiñ roll-labour ar sizhun pe gouestlañ nebeutoc'h a amzer d'an danvezioù ret, ar pezh a zo dic'hallus ». Ma, tudañ, ar pezh a zo dic'hallus amañ a zeu da vezañ gallus ahont, rak d'an 12 a viz Mezheven e veze sinet e Alger un emglev a genlabour sevenadurel etre Ministr Aljeriat an Deskadurezh vroadel ha Kannad Bro-C'hall (Sel. « Le Monde », 13-6-63). Krouet ez eus bet un ofis sevenadurel gall, a reno en Aljeria 8 kelenndi ha 600 klas kentañ derez ; en holl skolioù-mañ e vo roll-labour an deskadurezh ar memes hini hag hag e Bro-C'hall, hogen kentelioù a vo roet ouzhpenn diwar-benn en arabeg, istor ha douaroniezh Aljeria, ar brederouriezh arabek evit ma c'hello ar skolidi prientiñ ar vachelouriezh gall-aljeriat da vezañ krouet.

Divunet hoc'h eus marteze perak eo bet posubl kemm-mañ evel-se ar roll-labour e skolioù gall Aljeria.

AN ANVIOU-BADEZ BREIZHEK, Hañv 1963

Roet e vez abaoe un nebeut bloavezhioù muioc'h-mui a anvioù breizhek, pe sellet evel breizhek, d'ar vugale. Enklaskoù hir a vefe ret ober evit merkañ emled ar c'hiz nevez-mañ. Evit kaout un alberzh, setu an evezhiadennoù a c'heller ober goude bezañ lennet teir niverenn « La Bretagne à Paris » (niv. an 28/6, 19/7, 16/8/1963) rak ar gelaouenn-mañ a embann bep sizhun roll ar ganedigezhioù, an euredoù hag ar marvioù evit pep kanton a Vreizh. Diaes eo jediñ kementad an anvioù breizhek evit Breizh a-bezh ; evit 2.500 (wardro) ganedigezh enskrivet war an teir niverenn e kaver 215 a c'hell bezañ sellet evel « breizhek », ar pezh a rofe ur c'hementad dindan 10 %, met uheloc'h e gwirionez eo ar c'hementad gwirion. Ret e vefe lemel da gentañ ar ganedigezhioù c'hoarvezet e tiegezhioù estren, ha diaes eo hen ober, ha ret e vefe kontañ marteze evel

anvioù breizhek « Alain », ha marteze « Patrick » ivez (tud 'zo a gav dezho ez eo an anv-mañ breizhek-rik), rak n'int ket bet kontet er roll ha niverus-tre ez int. Kementad an anvioù breizhek roet e Breizh a dle bezañ tost ouzh 12 pe 15 %.

Ret eo anzav avat ne gaver ket kalz a stummoù brezhonek-rik ; bez e c'heller degemer evel anvioù breizhek stummoù brezhonek an anvioù kristen deuet da vezañ etrevroadel, hag eveljust an anvioù sent breizhat.

Evit ar re gentañ bez e seblant ober berzh an anvioù oc'h echuiñ dre « ik » (skrivet « ick ») met an anv e-unan e vez alies an anv gallek. Setu al listenn anezhe :

Pierrick, 14 ; Loic, 16 ; Yannick, 20 ; Annick, 7 ; Mariannick, 6 ; Lenaick, 2 ; Soizic, Soizick, 2 ; Yvonnick, 2 ; Darig, 1 ; Jeannick, Janick, 4 (met daoust hag e vez roet an anv-mañ d'ar baotred pe d'ar merc'hed).

Stummoù brezhonek-rik ne vezont ket roet alies, nemet Yann (15, ha ma lakaer Yannick ouzhpenn : 35). Met roet eo bet ivez Rozenn (2), Mikaël (1), Anna (1).

E-touez an anvioù Sent Breizhat e kaver dreist-holl « Yves » ha « Herve ». Bep gwech ez eo bet roet « Yves » dindan e stumm c'hallek, ma lakaer gant Yves ar stummoù all evel Yvon, Yvonne, hag anvioù-badez maz eo Yves un darn anezho (Jean-Yves, Maryvonne) e tizher 55. Roet e vez ivez anvioù sent all, Herve a zo bet roet 30 gwech, Gildas 6, Ronan 9, Armel hag Armelle 8, Gaele 3, Gwenaël 6, Gwenole 2, Brieuc 1, Clet 1, Servanne 1, Nolwenn 1, Gwendal 1, Tudual 1. An darn vuiañ eus an anvioù-se a zo bet roet hervez o stumm c'hallek (Yves, Gildas, Brieuc hag all) pe hervez reizhskrivadur ar galleg. Darn anezhe koulskoude o deus ur reizhskrivadur vrezhonek, da skouer : Nolwen, Darig, Gwenaël, Gwendal.

Anat eo e vez roet muioc'h-mui anvioù « breizhek » d'ar vugale, rak pa seller ouzh rolloù an dud aet da anaon ne vez ket kavet kalz a anvioù heñvel. Un druez eo eveljust ne vez ket degemeret muioc'h a stummoù brezhonek-rik, met dreist-holl stummoù gallek (nemet Yann) ha gallekaet evel Patrick, Annick.

Ret eo koulskoude teurel evezh e vez roet bremañ anvioù brezhonek d'o bugale gant tud ha n'int ket en Emsav, hag e c'hoarvez an dra-se kement e Breizh-Uhel hag e Breizh-Izel.

P. P.

LIZHER DA GANNAD BRO-C'HALL EN IWERZHON

Al lizher da heul a zo bet kaset e galleg, da Gannad Bro-C'hall en Iwerzhon. Pledañ a ra gant kudenn an D' Etienne a zo bet lamet digantañ e c'hoprou-tiegezh dre ma kelenne e vugale e brezhoneg. Al lizher a zo bet kaset gant Oscar Mac Uilis eus Dalkey e-kichen Dulen.

« Aotrou,

Skrivañ a ran deoc'h evel kannad Bro-C'hall en Iwerzhon ha kalz gwelloc'h e vije bet din chom hep hen ober, n'on nemet un den

prevez, met un den prevez hag a zo bet desket dezhañ komz galleg azalek e vugaleaj ha da sellout ouzh Bro-C'hall evel ur vro a sevenadurezh uhel.

Diwezhatoc'h em eus gweladennet Bro-C'hall ha kroget d'anavezout un nebeut gwirionezioù ma 'z on bet kerseet ganto.

A-viskoazh em eus kredet e oa ret bevañ ha lezel bevañ, met e Bro-C'hall ar sevenadurioù bihan n'o deus ket ar gwir da vevañ. O yezhoù a vez argaset eus ar skolioù kentañ, nemet un hanter eur ar sizhun d'ar re a fell dezho, war-lerc'h ar skol, kement hag ober goap. Ar skolioù prevez a zo bet mouget pa ne felle ket dezho heuliañ al lezennoù-se.

Ha bremañ setu kudenn an D^r Etienne eus Kastelin hag a zo bet nac'het outañ ar goprou-tiegezh evit bezañ kelennet e vugale er gêr dre o yezh-int, ar brezhoneg, er vro vrezhoneger.

En em c'houlenn a reer ha talvezout a ra da Vro-C'hall ober gant ar Vretoned keodidi a eil renk ha klask heñvelekaat an holl rannvroioù an eil ouzh egile, nac'h o gwirioù kulturel d'ar broioù-suj ha reiñ dezho ur c'hemplez truezus a izelder.

Kement-se ne ra nemet droug da Vro-C'hall ha pellaat diouti he mignoned kozh. Nevez 'zo, da skouer, em eus lennet afer Gwarnig war ur gelaouenn neerlandek.

Spi am eus e root da c'houzout d'ar re o deus beli da herzel ouzh seurt heskinerezh, ar pezh a soñj ar broioù all. Evito, kenderc'hel d'ober kement-all a vefe diskouez e-keñver ar c'hultur ur spered kar da hini an O.A.S.

Daoust ha ken dinerzh eo ar galleg mar deo ret dezhañ lazhañ ar c'hulturioù hep difenn hag a vev dindan ar stad gall.

Digemerit... h.a. »

OSCAR MAC UILIS

M. A. B. L.

NIVERENN 100 « AL LIAMM »

Dre ma n'eo ket degouezhet ganeomp e koulz ar pennadoù diwar-benn Fañch ELIES e vo gouestlet an niverenn 100 d'hor mignon. Pedit a reomp hol lennerien d'hon digareziñ.

CHOMLEC'H KEMMET

Hor mignon Jarl PRIEL a gemenn dimp ez eo aet da chom e kreisteiz Bro-C'hall. Setu amañ e chomlec'h nevez : e ti an Ao. Renaud, 217 La Penne-sur-Huveaune (Bouches-du-Rhône).

Pezh-c'hoari Jarl Priel « *Tri Devezhour evit an Eost* » bet embannet war « Al Liamm » a vo c'hoariet (e galleg, eveljust) gant Radio Roazhon, e miz Here.

fi-Moulerzh « AR SKREV » - Bali ar Marichal de-Lotrie-de-Tassigny AR BAOL

Diskleriet hervez lezenn : 3^{re} trimiziad 1963 - Niverenn er vaulerez : 22231

Ar merour : P. AR BIHAN

AL LIAMM - TIR NA N-OG

Kelc'hgelaouenn daouviziek

Koumanant - bloaz :

war baper boutin, 15

war baper kaer, 20 F

Studierien, soudarded, kloareged 8 F

Rener : Ronan HUON

« Gwaremm ar Groaz »

2, Venelle Poulbriquen - BREST

Merour : P. LE BIHAN

6. Domaine des Hocquettes

SURESNES (Seine)

C. C. P. 5349-06 Paris

E Breizh-Veur kas an arc'hant da :

Lili THOMAS

Fiat 5, 19 South Marine Terrace

ABERYSTWYTH - Wales



HOR YEZH

kelaouenn studi ar yezh
embannet bep tri miz e
stumm kaieroù liesskrivet

40 NIVERENN A ZO BET EMBANNET
BETEK-HEN

Levrioù da zeskiñ ar yezhoù keltiek all a vez
embannet ivez.

Embannet c'hoazh gant « Hor Yezh » :
Istor ar Yezhoù Keltiek, gant Arzel Even.

E pep kaier eus HOR YEZH ez eus pennadoù diwar-
benn
ar brezhoneg, ar yezhoniezh, istor ar yezh, ar c'heltieg.

*Renet eo HOR YEZH gant Arzel Even
lennour e Skol-Veur Aberystwyth*

Koumanant : 12,00 lur

Sekretourez ha teñzorierrez : J. QUEILLÉ,
47, rue Notre-Dame, Guingamp (C.-du-N.)

— C. C. P. 1240-22 Rennes —